

**Bleuniou Breiz** (1888)

.Modernnaet eo bet an doare-skriva.

**Taolenn**

**Clec'h** (Montroulez 1788 – Kastell-Paol 1872). Le glanneur celtomane

**PELERINEZ RUMENGOL**

**Proux** (Poullaouen : 1811-1873)

**KIMIAD EUR ZOUDARD YAOUANK.**

**Luzel (Fañch an Uhel)** (Plouared 1821 – Kemper 1895)

**BREIZ-IZEL**

**Kervennig** (Lambezelleg 1835 –Pariz 1923)

**AR BREIZAD**

**Kersale** (Loktudi 1818 – Montroulez 1892)

**ILIZ PLONEOUR**

**Fañch an Uhel**

**SON**

**Luzel (Fañch an Uhel)** (Plouared 1821 – Kemper 1895)

**MARO BARZ BREIZ-VIHAN**

**Kanaouenn goz :**

**KLOAREG LAOUDOUR**

**Kanaouenn goz**

**FONTANELLA (KAN TREMEL)**

**Souvestr** (Plourin 1831 – Pariz 1896)

**AR ROUE GRALLON HA KER-IZ**

**Kanaouenn goz**

**KOAD ELEZ**

**François Le Scour ( ?)**

**AR BARZ**

**Pierre Huon ( ?)**

**KAN AR GOUKOUG**

**Son goz.**

**KIMIAD D'AR YAOUANKIZ**

**Clec'h François-Marie (Montroulez 1788 – Kastell-Paol 1872)**

**HUÑVRE AN DUK A VREIZ, YANN PEVAR** (Notenn gand Embann an Hirwaz : iskiz eo ar skrid-se. Lakaet eo bet pa oa el leor orin).

**Fañch an Uhel**

**KLEMMGAN WAR MARO PROSPER PROUX**

**Anatol Ar Braz**

**JANEDIG AN DIZEZ**

**Prosper Proux**

**MA VIJEN BARZ**

**Le Jean ( ?)**

**KIMIAD AR BARZ BREIZAD**

## PELERINEZ RUMENGOL

An avel a oa yen, an douar skornet-oll ;  
Penn-da-benn gand an hent a ya da Rumengol,  
Eur wregig paour, en eur grena,  
Pelerinez santel, war he zreid diarhen,  
A yee, hag en he dorn eur wialennig wenn,  
Da di an Itron Varia.

Arru bet an aoter : -Deut on c'hoaz d'ho kweled,  
Gwerhez, dre m'ho karan, ha dre m'am-eus soñj mad,  
Pa zeuis kenta d'ho ti santel ;  
Neuze, war va daoulin teir zro d'ho mur a ris  
Leun euz ho karantez, gand daerou ho pedis  
Ma vijen mamm heb dale pell.

Kousker war va halon, a-benn deg miz goude,  
E oa eur mab bihan, eun êlig da Zoue ;  
Evel peb mamm, gê e kanen ;  
Tad-koz e korn an tan a hoarze o selaou ;  
Allaz ! petra 'oa din neuze kana soniou ?  
Ar vuhez 'zo c'hwerf da dremen !

Red eo kaoud soudarded, ha warhoaz or bugel,  
Ma n'en-devez souten, mar deut d'hen dilezel.  
Da vrezelour 'vo kemeret ;  
Ha ni, tud-koz mantret, petra 'raim er vro ?  
A ! koulz e vo hada louzaouenn ar maro  
Dirag on dor bepred serret !

Evid va mab em-eus greet ar pezh a dleen :  
Peillet em-eus uhelvar, melchon, ha benterhenn,  
D'an noz, war ribl eun hent distro ;  
Eur walenn stên, er vourh, 'zo din benniget mad,  
En eur feunteun zantel eo gwalhet an dillad,  
Ar re warhoaz 'vo war e dro.

Eun harp a vanke dim nerzusoh ha dousoh ;  
Va gwalenn wenn em dorn, on deut beteg ennoh.  
N'am-eus goulou na kurunenn ;  
Ni, labourerien baour, n'on-deus netra ebed ;  
Koulskoude e teuom ; on anaoud a ret ;  
Gwerhez, c'hwi 'zo mamm ar beorien !

C'hwi 'ziwallo va mab, c'hwi hoh-eus eñ roet !  
Ne fell ket deoh e ve didud da disvroet,  
Kaset pell euz ar menez-mañ ;  
Nann, nann, ne fell ket deoh e ve 'vel hualet  
E mogerious eur gê e leh ne gomzer ket  
Ar brezoneg evel amañ.

Or bugel a zo deom ! Nann ! ne gredin biken,  
E ve deut eur ar pred ma ne ve em hichenn  
Euz an daol o tebri e damm ;  
Her gweled, evidom n'eus ket a vuhez all !  
Laouen pa vez debret eun tamm bara-segal,  
P'hen debr ar mab gand tad ha mamm !

Eun deiz, o ! Mamm Zantel, ho mab heb lavared,  
(Ha se gand eur beleg 'zo bet din gwarantet),  
Da iliz eur gêr vraz yeas<sup>1</sup>,  
E glask a reeh dre-oll, e hervel gand daerou,  
Evid ho tiboania e klakeh ar helou :  
Emañ amañ ! et heb enkreuz !

O ! Rouanez an Neñv ! ar gomz-se a glaskeh  
En amzer ho poaniou, d'ar houlz ha ma oueleh,  
Grit m'e gavin bremañ-souden.  
Leveret d'ho mab ker, pa eo bremañ Roue,  
Penaoz diouer eur mab a zo digand Doue,  
Brasa anken eur vamm gristen.

Kenavo 'ta, Gwerhez, bet em-eus va mennad.  
En eur gana oh braz, ha dreist pep tra oh mad,  
War-zu ar gêr en em dennan ;  
Sempl e oan o vond tre ; o vond kuit ez on serz.  
N'ay ket kuit... chom a ray ; hogen, daoust d'am nerz,  
Hag e krenan, hag e ouelan !

An hini 'ra ar werz 'zo kristen, 'zo Breizad,  
Hag ar vamm hag ar mab a oar d'anaoud mad.  
Hemañ, e Kerne-meur merer,  
D'an noz e-harz ar groaz aliez e lavar  
E tle an eurusted en-deus war an douar,  
Oll, da batronez e vamm ger.

---

<sup>1</sup> yeas : "iez" er skrid orin.

Prosper Proux : Poullaouen : 1811-1873

## KIMIAD EUR ZOUDARD YAOUANK

Va halon a zo fraillet dre nerz va ankeniou,  
Em daoulagad entanet n'ez eus ket a zaerou ;  
Allaz ! Deut eo an devez ma rankan dilezel  
Leh kaer ma bugaleaj, ma bro dous Breiz-Izel.

Adieu dit, va zi balan, war leinig ar grehenn.  
Tachenn hlaz war an hini<sup>2</sup>, bugel, e c'hoarienn,  
Gwez ivin ker bodennet en disheol euz ar re<sup>3</sup>  
E-pad tommder an hañvou e kousken da greizteiz.

Adieu, va mamm ha va zad, bremañ n'esperit mui  
E chomfe ho mab karet 'vid harpa ho kozni,  
'Vid pourvei deoh bara 'vel ma 'peus greet dezañ.  
Al lezenn 'zo didruez, ho kuitaad a rankan.

Nag a wech, ma mamm dener, e rankefet gouela,  
Pa zeuy ma hi ankeniet ouzoh d'en em frota,  
Pa welfet 'barz an oaled, va skabellig goullo,  
Hag ar hevnid o steui deuz ma fennbaz dero.

Adieu, bered ar barroz, douarou benniget,  
A holo va zadou-koz gand Doue bet galvet,  
Da Ouel an Anaon klemmuz n'in mui war he peziou  
Da skuilla an dour santel mesket gand va daerou.

Adieu, va muia-garet, va dousig koant Mari,  
Eur blanedenn diremed a zeu d'or glahari,  
On eurusted, on joaiou skeduz 'zo tremenet  
'Vel eur goumoulenn skañvig gand an avel kaset.

Ne welin ken da lagad ker lemm ha ker levenn<sup>4</sup>  
O vervi a blijadur, du-ze, pa erruen ;  
Da zornig gwenn ker distag o kas ar harr en-dro :  
Da vouez dous ken na glevin o kana ma gwerzio'.

Pa oam er hatekismou on-daou, c'hoaz bugale  
On halonou tenerig dija en em gleve ;  
Dirag Gwerhez ar Hroaz-Hent nag a wech e touejom  
Ne erruje birviken disparti entrezom.

Yaouank ha dizoursi, aliez ne ouiem ket  
Pegement an enkreziou er vuhez 'zo mesket ;  
Evidom ne oa neuze lezennou na roue,  
N'anavezem 'med eul lezenn, hini ar garante'.

---

<sup>2</sup> an hini : war pini er skrid orin.

<sup>3</sup> ar re ; euz pere er skrid orin.

<sup>4</sup> levenn : laouen.

Adieu, va nez-amezeg, Yannig, va gwir mignon,  
Kamarad va hoariou, va breur dre ar galon  
Piou, siwaz ! a gemero eul lod euz ma foanio',  
Piou bremañ, pa vin seder, ganen-me a hoarzo ?

Heb da vreur, te 'yel bremañ er parroziou nesa  
Da bigosad al leuriou, 'barz al lazou-dorna ;  
Hebdon, te 'yel da zisput maout ar hourenadeg,  
Da zacha war ar zeizenn e-barz ar varadeg.

Adieu, va hi kêz Mindu, va leal kamarad,  
N'efom ken deuz ar beure da glask roudou ar had,  
Ne glevin mui er menez da chilpadenn skiltruz,  
War va dorn mui ne zantin da deod karantezuz.

Adieu, eun nebeud amzer, kalz a vignoned yen  
'Barz er zoudard divroet, moarvad, ne zoñjfont ken ;  
Mez da galon-te, Mindu, n'eo ket ker ankoueüz,  
Pell e ri c'hoaz va hañvou dre da yezou klemmuz.

Adieu, va hazeg velen, skañv evel eun heiez,  
Mistr evel eul logodenn, koant 'vel eun oanez ;  
Ne zantin mui, dindanon gand an hast o tripal,  
Ma daouarn mui ne stagfont ar zeizenn war da dal.

Adieu, oll blijaduriou, foariou, pardonioù gê,  
Soubennou lêz, nozveziou, festou, leuriou neve',  
Ebatou ker birvidig, biniou stard ha sklinter,  
Ne drido ken va halon gand da zoniou lirin.

Adieu, kement a garan, adieu, da virviken,  
Pell deuz a Vreiz me 'varvo, mantret gand an anken,  
Beza 'z eus plant kizidig, da chom leh m'int krouet :  
A weler o tizeha raktal 'm'int divroet.

Luzel (Fañch an Uhel) (Plouared 1821 – Kemper 1895)

### Breiz-Izel

- Lar din, anaoud a rez ar vro
- Leh, war ar garreg, sao dero ;
- Leh kan arbarz war dreuz e zor,
- Ha war an aod e trouz ar mor ?
- 
- - Ya, ar vro-ze eo Breiz-Izel,
- War ar bed pa daolan eur zell,
- Ne welan hini koulz hag hi,
- A houlenn ker braz meuleudi. –

Lar din, anaoud a rez ar vro  
Leh ma kaver c'hoaz war eun dro  
Komz Doue hag ar feiz o ren,  
Ha reiz hag eeun kalon an den ?

Ya, ar vro-ze eo Breiz-Izel,  
Me a garfe, 'vel eur sparfell,  
Kaoud diouaskell, evid moned  
'Trezeg ar vamm 'deus ma ganet.

Lar din, anaoud a rez ar vro  
Leh na gren den rag ar maro ;  
Ma vever e doujañs Doue  
Ha doujañs lezenn ar roue .

Ya, ar vro-ze eo Breiz-Izel,  
Evidon beza diouti pell,  
D'al leh m'eo chomet ma halon  
Ma spered 'nij 'vel eur gudon.

Lar din, anaoud a rez ar vro  
Leh evel bleun 'barz ar parko'  
Ma weler ar merhed yaouank  
Er pardonioù, seder ha koant ?

Ya, ar vro-ze eo Breiz-Izel,  
Kudon a nij a-denn-askell  
War-zu ma bro, lavar, koulmig,  
Deiz-mad da Vona, ma dousig.

Lar din, anaoud a rez ar vro  
A gar he gizioù koz atao ;  
Ma peder c'hoaz en ilizou  
Hag er vered, war ar beziou ?

Ya, ar vro-ze eo Breiz-Izel.

Koabrenn, kaset gand an avel,  
Eun tamm d'an douar diskennit,  
Ha bete ma bro ma dougit.

Lar din, anaoud a rez ar vro  
Ma kaner gerziou ha sonio'  
E-tal ar fornigell, beb noz  
E koun oberiou ar re goz ?

Ya, ar vro-ze eo Breiz-Izel,  
Leh ma fell din mond da vervel,  
Ha beza eun deiz douaret  
Gand ma broiz en o bered.

\*

An hini a zavas ar zon  
'zo eur zoudard, trist e galon,  
Hag a varvo gand keun d'e vro,  
Med prest da Vreiz e ve distro.

**Kervennig** (Lambezellec 1835 –Pariz 1923)

**AR BREIZAD**

Da hiziou e dud koz stard beteg ar maro ;  
Didrouz hag amzerier, dihoant da weled bro ;  
Dichal hag heb ezomm, pinvidig gand netra ;  
Gand an nebeud en-deus e ra vad d'an nesa ;  
Kaled ouz ar poaniou, ampart e peb labour,  
Breizad a vez divlamm, ma n'evfe nemed dour.



**Kersale** (Loktudi 1818 – Montroulez 1892)

## **ILIZ PLONEOUR**

« War-zao !Ploneouriz sant Jermen !  
Ho pleo troñset ha sonn ho penn,  
It da ziskouez d'ho koapaerien  
Ne grenit ket dirag feskenn.

Kalz re bell hoh-eus gouzañvet.  
En abeg din, va mignoned,  
Peb goapaerez, peb glaouregz  
A-berz kement a stlej botez !

Kement koz-ki a zo e vro,  
(Boued ar vran o horvou maro !)  
Pa fell deoh moned e neb leh,  
A zeu da chalpad war ho lerh !

War-zao eta ! va fillored !  
Diskouezet n'e' ket feskenned  
'Ouezfe miroud ouz Ploneouriz  
A zevel arre o iliz. »

En huñvre 'klevis evel-henn  
Patrom Ploneour Sant Jermen ;  
Ha me sevel taer, hebdale,  
Gand tarz-an-deiz, war ma gwele ;

- Ha pebez savar eo hemañ ?
- Hag ar brezel 'zo er vro-mañ ?
- Hag ar Zaoz ruz, on enebour,
- En-defe dreistlammet ar mour<sup>5</sup> ?
  
- Kloareg yaouank, mar plij ganeoh,  
Stenned ho tiouskouarn gwellikoh :  
Ar Zaoz ruz ne ra trouz ebed ;  
Plouneouriz, ne lavaran ket.

War zao ez int oll, en eur pez,  
Da zevel o iliz nevez ;  
Oll o hirri o-deus sternet.  
Da zegas an danvez 'zo<sup>6</sup> red.

Kleved a rit oh hinteal  
Ar marh, eur zeizenn ouz e dal ;  
Hag o vlej a eun ejenn pounner  
Evel ma kruz kurun en êr.

---

<sup>5</sup> mour : mor, evid ar rim.

<sup>6</sup> zo : eo.

Klevoud a rit o c'hwitellad  
Ar bleniour karr, a galon vad :  
Ar garrigell leun o strakal,  
He rod, dindan, o wigourad.

Klevoud a rit o tiskarga  
Mein war vein oh en em zrailla ;  
Ha dir ar gizell o skrija,  
Oh o zrohi, oh o bena.

Klevoud a rit micherourien  
En eur gana eur ganaouenn  
Ker kaer ma tav an evnigou  
Kludet er hoad war ar brankou.

Ar Juzevien, amzer gwechall,  
Kaset da chom er broiou all,  
O veza deuet war o hiz  
A yeas da zevel o iliz ;

Pobl Doue 'oant ; pobl Doue om !  
Evelto gand joa 'adsavom  
Ti or patrom muia-karet  
Ti Doue a oa diskaret.

Stardom c'hwek ! ayta ! mignoned !  
Eun taol c'hoaz hag ema sonnet !  
Eun taol c'hoaz hag ema toet !  
Eun taol c'hoaz hag ema peurhreet ! »

Peurhreet eo ! Ra zeuio bremañ  
Deuz an neñvou Doue ennañ<sup>7</sup> !  
Ra ziskennou, heb dale pell,  
On Eskob mad oh he gervel.

Ha c'hwi, skiñit, amezeien ;  
Hejit ho penn c'hoaz o tremen !  
Horjellit ho kleier ouzom !  
Brimbala or re a reom !

---

<sup>7</sup> ennañ : enni.

**Luzel (Fañch an Uhel)** (Plouared 1821 – Kemper 1895)

**EUR ZON**

Me ‘m-eus eun dousig, war va feiz,  
Hag a zo kaer evel an deiz ;  
‘Vel an deiz d’an nevez-amzer,  
Pa zav an heol seder ha sklêr.

Me ‘m-eus eun dousig en Treger  
Ha dreist pep tra ‘zo din-me ker,  
Eun dousig koant, euz ar hoantañ,  
A-greiz ma halon he haran.

Ma em-be spered ha skiant,  
Deskadurez hervez ma hoant,  
Me rafe eur zonig dezi,  
‘Vid kanañ e toull dor he zi.

Daoulagad hlaz ‘zo en he fenn,  
Sklêrroh evid dour er werenn :

He dioujod a zo diou rozenn  
‘Vel ar mel he bleo ‘zo melen.

Diouz ar beure ha diouz an noz,  
Me ‘wel he zi diwar ar roz.  
Ar moped euz he chiminal  
A lak ma halon da dridal.

Bep sul, e-pad an overenn  
Ne ran ‘med trei, distrei ma fenn ;  
Ma lar ma zad ha ma mamm din :  
« Ma mab, amañ om ‘vid pediñ. »

Pa vin ‘barz em bez, kousket mad,  
Ha serret kloz ma daoulagad,  
Ma tremen warnon ma dousig,  
E lammo c’hoaz ma halonig.

Er Baradoz ni ‘n em gavo  
Hag eno c’hoaz ni ‘n em garo ;  
Gwir garantez etre daou zen  
Gand ar maro ne hell tremen.

**Luzel (Fañch an Uhel)** (Plouared 1821 – Kemper 1895)

**MARO BARZ BREIZ-VIHAN**

Mervel evid beva !

Kañvou, kañvou dit, Breiz-Izel !  
Hirvoudi ha skuilla daero',  
En lez an nor don, c'hwi, rehel<sup>8</sup>,  
En kreiz ar hoajou, c'hwi, dero !

An ankou kriz evel eur bleiz  
Pa deu, er goañv, euz ar hoad,  
A falh hep truez e bro Breiz ;  
Hag e falh 'zo ruz gand ar gwad.

Hogen ar gwad-ze 'n-deus c'hwez vad,  
C'hwez ar roz ha c'hwez ar spern-gwenn ;  
Gwad eur barz eo, eur gwir Vreizad  
'Gane e vro e pep tachenn.

Maro Brizeux, Barz an Armor,  
Evid beva en eur bed gwell !  
Kanit kañvou, koajou ha mor,  
Eostik-noz, klemm a vouez uhel.

Mari ar Vouster, war he bez  
Pedit Doue hag ar Werhez ;  
Ha lakit eur rozenn nevez  
'Uz da galon ar haner kêz.

Hogen peleh 'vo douaret  
Korv ar barz a gane ker mad  
Ar vro ganeom-ni oll karet,  
Mor tro-war-dro, hag e-kreiz, koad ?

Lezit hen e Beg ar Raz,  
Hag eur peulvan eh harz e benn,  
Dirag Sizun, ma welo c'hoaz  
Al leanezed o tremen.

Pe c'hoaz 'barz traonienn Karnag  
Dindan ar mênhir ar brasa,  
Ha grem-dostig<sup>9</sup>, en tu bennag  
Eun dervenn 'vo red da blanta.

War ar mên-hir rust, digempenn,  
Pentit eul levrig alaouret,

---

<sup>8</sup> rehel : reier.

<sup>9</sup> grem-dostig : ? Marteze "krenn dostig".

Hag ouz an dervenn eun delenn  
Gand eur sug aour a vo staget.

Hag an avel-mor, o tremen  
A gano gwerziou ha sonio' ;  
Hag an eostik war an dervenn  
E-pad an noz a hirvoudo.

Nann, emezañ, lakit da horv  
En eun draonienn e-tal ar Skorv  
A zeu diouz kostez Kermelo ;  
Eno douosh me a gousko.

En ho akademi Gallaoued,  
N'hoh-eus ket goulennet Barz Breiz  
En-deus bepred ker braz kanet  
E vro Breiz-Vihan hag ar feiz.

Md hoh-eus greet, rag er bed all  
Ema gand Gwenc'hlan, Aneurin,  
(Eun akademi ha n'e' ket fall)  
Gand Taliesin ha Marzin.

Hogen e Breiz zo<sup>10</sup> barzed c'hoaz ;  
Kanit oll e veuleudiou  
Hag a chomo er vro mil bloaz ;  
Kanit, oll, ha savit gwerziou.

Me 'garfe c'hoaz, dreist ar mor glaz,  
D'or breudeur a chom e pell-bro,  
Douget war ziou-askell pluñv braz,  
Galloud lared :Skuillit daero'

Allaz, marv eo Barz Breiz-Izel !  
Koajou ha mor don, hirvoudet !  
Maro ! « mez evid beva gwell, »  
He-deus eur vouez diouz kreh laret.

---

<sup>10</sup> zo : ez eus

**Kanaouenn goz :**

## **Kloareg Laoudour**

### I

Kloareg Laoudour a lavare  
D'e vammig paour, eun deiz a oe :  
Grit din eur banne soubenn lêz  
Ma'z in a-benn d'al leur nevez.

Kloareg Laoudour a lavare  
E Kervarzin, pa arrue :  
« Deiz mad ha joa 'barz an ti-ma',  
Ar Bennherez, peleh ema ?

Ema war-lêz, 'barz er gambr wenn  
O kriba flour he bleo melen.  
Klevit he han dous ha klemmuz  
Evel hini an eoskik-kuz.

Kloareg Laoudour, it daveti,  
Mar doh evid he frealzi. »  
« Deiz mad deoh, ma dous Pennherez,  
Ho kalonig, hag hi 'zo êz ? »

« Va halonig a zo seder ;  
Nag hoh hini, va zervicher ?  
Dalit eur gador, azezet,  
Deut da dal an tan da dommed. »

« Ne azezin na ne dommin ;  
Mond d'al leur-nevez e fell din. »  
« D'al leur nevez me ne din ket,  
Ne vin ket laosket da voned.

Marheg Lambaol 'zo 'r leur-nevez,  
A lar feteiz kaoud ho puhez. »  
Kloareg Laoudour, 'vel ma klevas  
E gleze noaz a zihouinas.

« Ma ve den e-barz en ti-me  
Da viroud ouz va dous ha me,  
Ne daim on-daou d'al leur-neve',  
Me hen treuzfe gand va hleze. »

He zad, he mamm, 'vel ma klevjont,  
D'ar bennherez e lavarjont :  
« Diwisket ho proz ruz brava  
Ha gwisket ho proz limestra.

Gwisket ho prozig limestreg,  
Krogit e kazell ar hloareg,  
Ma laro an dud dre ar vro  
Ez a al Laoudour d'ar maro. »

## II

Marheg Lambaol a lavare  
'Barz el leur-nevez en deiz-se :

« Me 'wel Laoudour o tond a-bell,  
Ar bennherez ouh e gazell,  
Ar bennherez a Gêrvarzin,  
A gousko en noz-mañ ganin. »

Kloareg Laoudour a lavare  
El leur-nevez pa arrue :  
« Peleh ema ar zonerien  
Ma sonit din eun aobadenn.

Ma sonint da gloareg Laoudour  
A roy dezo beb a loeiz aour.  
Ma sonint an dro hag ar bal,  
Ma'z in gand va dous da zañsal. »

Marheg Lambaol a respontas  
Da gloareg Laoudour p'hen klevas :  
« 'Vid da zañsal n'ez afet ket,  
Da houren ouzin e teufet.

Ar henta ahanom a gouezo,  
Biken ahane ne zavo. »  
Kloareg Laoudour a respontas  
Da Varheg Lambaol p'hen klevas :

« Pa hoh-eus-hu ma goulennet  
N'oh ket da veza refuzet ;  
N'oh ket da veza refuzet ;  
Pennherez, va mañch din, sachet. »

Marheg Lambaol, 'vel ma klevas  
'N eur hwitell arhant a hwezas.  
'N eur hwitell arhant a hwezas,  
Triweh denjentil 'n em gavas.

Triweh kleze 'zo dihouinet,  
Marheg Lambaol an naontegved.  
Ar bennherezig a ouele ;  
Ne gavje den he frealzje ;

Ne gavje den he frealzje,  
'Med ar hloareg, hennez a ree.  
« Tavit, Naig, na ouelit ket,  
Rag c'hwi n'ho-pezo droug ebed.

Rag c'hwi n'ho-pezo droug ebed  
Nag ho tous kloareg kennebed<sup>11</sup> ;  
Kloareg Laoudour a zo paotr mad  
Pa gas e vestrez d'an ebat. »

N'oa ket e her peurachuet,  
Marheg Lambaol en-deus lazet.  
Marheg Lambaol en-deus lazet  
Ha seiteg euz e gonsorted.

### III

Kloareg Laoudour a lavare  
E Kervarzin pa errue :

« Setu ho merh yah ha divlamm  
'Vel pa oa ganet gand he mamm. »  
Kloareg Laoudour a lavare  
D'e zous ar Bennherez neuze :

« Va dousig koant, n'hen nahin ket,  
Ho kuitaad bremañ 'zo red.  
Red 'vo mond beteg ar roue  
Da gaoud gwaranti d'am buhe'.

### IV

Kloareg Laoudour a lavare  
E lez ar roue pa arrue :  
« Dematoh<sup>12</sup>, roue ha rouanez,  
Me 'zo deut yaouank d'ho palez :

« Petra a-nevez eh-eus greet  
P'out deut ker yaouank d'or gweled ? »  
« Marheg Lambaol am-eus lazet  
Ha seiteg euz e gonsorted.

Ha seiteg euz e gonsorted  
O klask divenn brud va fried.  
Pried din n'eo ket c'hoaz brema'  
Mez 'ma war ar poent da veza. »

---

<sup>11</sup> kennebed : kennebeud.

<sup>12</sup> Dematoh : demad deoh.



Roue Bro-Hall en-deus laret :  
« Gwir a-walh eo eh-eus lazet,  
Rag bez'am-eus en da eneb  
Meur a lizer oll heveleb.

Ha kent ma'z i euz al leh-se  
Ez-pezo kollet da vuhe'.  
Kloareg Laoudour, c'hoari rafet<sup>13</sup>  
Eun taol c'hoaz ouz va zoudarded ? »

« Ya, degaset o din er porz,  
Pa ve hanter-kant, ne ran forz.  
Kriz 'vije an den na ouelje  
O weloud e porz ar roue

Gwad ar zoudarded o ruzia,  
Kloareg Laoudour oh o laza !  
Roue Bro-Hall a lavare  
D'e bachig bihan en deiz-se :

« Skrivit dezañ war baper gwenn  
Eh hell bale e pep tachenn :  
Skrivit dezañ war baper glaz  
Eh hell bale evel eur gwaz. »

Kloareg Laoudour a zo paotr mad  
Pa gas e vestrez d'an ebat.

---

<sup>13</sup> rafet : just a-rao e lavar ar roue "da vuhe" hag amañ "rafet".

**Kanaouenn goz**

## **Fontanella (Kan Tremel)**

### I

Fontanella en-deus greet le  
Biken en Leon troad ne lakje.  
Koulskoude en eur lared gaoud,  
E tremen Plounevez-ar-Faou.

Menez Arre ha Plougonvez  
Hag ivez ar Chapel-Nevez.  
Fontanella a houlenne  
E Koadelan pa arrue :

« Deiz mad ha joa 'barz en ti-ma' !  
Ar Bennherez, peleh ema ? »  
« Ar Bennherez a zo kousket,  
Taolit evez n'he dihunfet.

Fontanella 'vel ma klevas,  
Gand ar viñs d'an neh a bignas ;  
Gand ar viñs d'an neh eo pignet,  
Hag ar bennherez dihunet.

« Pennherez, lavaret din-me,  
Ha c'hwi anav Fontanella ».  
« Fontanelle n'anavezan ket,  
Kleved komz anezañ 'm-eus greet.

Ken na gredan mond da vale,  
Gand aon n'arrufe gane' .  
Rag klevet am-eus lavared  
Eo kustum da laerez merhed ;

Eo kustum da laerez merhed,  
Ha dreist-oll ar pennherezed. »  
« Rag Fontanella e krenit ?  
Mad, outañ bremañ e komzit. »

Ar Bennherez a lavare  
D'he matezig vihan neuze :  
« Matez vihan, ma zikouret,  
Evid kourach din ne vank ket. »

Eun hach-penneg<sup>14</sup> a oa ganti,  
Hag e hourdrouze he skei. »  
« Pennherezig, n'am skoit ket,

---

<sup>14</sup> hach-penneg : eur vouhal vihan.

Peotramant c'hwi 'vo nehet.

Mar galvan-me ma zoudarded,  
Pennherez, neuze e krenfet. »  
Fontanella a houlenne  
Digand ar Bennherez neuze :

« Pennherez, ha dond a refet  
Ganen da zouar ar Hallaoued ?  
Da veza war benn teir arme,  
Ha pried da Fontanelle. »

« Gwell eo ganen mond d'ar Follgoad,  
Ahane 'welin douar va zad.  
Ahane 'welin douar va zad,  
A ray kalz vad d'am daoulagad. »

## II

Fontanella a lavare  
D'e bach bihan eno neuze :  
« Kerz da houlen digand Mari  
Rei degemer deom en he zi.

Ma ne zigor ket he dor, torr hi,  
Laka 'n iliz da varchosi.  
Ar sakristiri da gao gwin,  
An Aoter vraz da daol kegin. »

Pa oant gwella gand ar chervad,  
'Komañs ar hleier brañsellad,  
'Komañs ar hleier da zeni,  
Fontanella da huanadi.

« Pachig, pachig, pachig bihan,  
Te 'zo hardiz, skañv ha buan,  
Kerz prim da lein tour an Intron,  
Da houzoud piou a zo o son.

Ar pach bihan a lavare  
Diouh lein an tour pa ziskenne :  
« Uhella ma hellen on bet  
Ha n'em-eus gwelet den ebed ;

Nemed ar Werhez hag he Mab  
'Zo o-daou oh o brañsellad. »  
Fontanella a lavare  
D'e zoudarded eno neuze :

« Daouzeg-kant soudard 'zo gane',

Profent oll beb a skoed neve',  
Profent oll beb a skoed neve' ;  
Daouzeg, ar Bennherez ha me !

Deom-ni bremañ oll gand on hent,  
Ha lezom o zier gand ar zent.  
Er Bennherez en-deus kroget,  
War e varh ganti eo lammet,

War e varlenn 'deus hi lakaet,  
D'al leandi 'n-deus hi kaset.  
Seiz vloaz eo bet el leandi,  
Ha seiz all 'oa pa'z eas di ;

He fevarzeg vloaz achuet,  
Ez int bet o-daou eureujet.  
Da Goadelan neuze int eet  
Hag eur mab bihan o-deus bet ;

Eur mab ker kaer 'vel an de',  
Patrom e dad Fontanelle.  
Ken na zegouezas eul lizer  
Da vond da Bariz a-benn-kaer.

Eul lizer da Fontanelle  
Da vond da gavoud ar roue.  
Ar Bennherez a lavare  
Da Fontanella en deiz-se :

« Fontanella, mar em haret  
Hoh-unan di ne yafet ket.  
Fontanella, chomit er gêr,  
Ha me 'gaso eur hannader. »

« Kannader ne vo ket kaset.  
Me 'yel va-unan d'o haoued.  
Grit ervad d'ho mabig bihan,  
Ma vo Aotrou e Koadelan.

### III

Fontanella a lavare  
Euz Trevihan pa ziblase :  
« Kenavo da barrez Tremel,  
Mar gellan ne vezin ket pell.

Mar bezan beo, e teuin d'ar gêr ;  
Mar bezan maro, e teuy lizer.  
Me 'roy eur banniel ar haerra

Ha gwiskamant d'ar Rozera<sup>15</sup>,

Ha gwiskamant d'ar Rozera  
M'ho-po soñj euz Fontanella. »

#### IV

Fontanella a lavare  
En lez ar roue pa arrue :  
« Deiz mad, roue ha rouanez,  
Deut on d'ho kaoud en ho palez. »

Ar roue neuze a lavaras  
Da Fontanella p'her gwelas :  
« Pa oh deut, deut mad ar vezet  
Evid d'ar gêr ne yafet ket. »

Fontanella a lavaras  
D'ar roue neuze p'hen klevas :  
« Re hlaz e kavan da varo<sup>16</sup>  
D'am barn ha d'am has d'ar maro. »

Ar roue neuze gand eun dremm hlaz  
Da Fontanella 'respontas :  
« Mar don-me re goz da varner,  
Te 'zo re yaouank da wastaer ! »

Fontanella a lavare  
D'e bach bihan eno neuze :  
« Pachig mad, kae bremañ buan  
Evidon-me da Goadelan,

Da lavaroud d'an Bennherez  
Ne zougo mui a zantelez ;  
Rei din eur roched da wiska  
Hag eul liñser d'am liena !

Ar roue neuze a lavaras  
Da Fontanella p'hen klevas :  
« Salhokras, se ne vezo ket ;  
E karteriou<sup>17</sup> 'viot dispennet,

Dispennet 'viot e karteriou  
Da lakaad war ar hroaz-heñchou. »  
Fontanella a lavare  
D'e bach bihan eno neuze :

---

<sup>15</sup> Rozera : Itron ar Rozera.

<sup>16</sup> da varo : baro war e zioujod.

<sup>17</sup> karteriou : tammou.

« Pachig, pachig, pachig bihan,  
Kae te bremañ da Goadelan,  
Ha goulenn eur plad alaouret  
Da lakaad va fenn da zelled. »

« Nann ! taolet 'vo war ar pave  
Da voull-killou d'ar vugale. »  
Fontanella a lavare  
D'e bachig mad eno neuze :

« Dalv eur boukl euz va bleo melen,  
Da staga er porz Trevien ;  
'Vid ma laro Trevihaniz :  
Bennoz warene ar markiz !

**Souvestr (Plourin 1831 – Pariz 1896)**  
**AR ROUE GRALLON HA KER-IZ**

Petra ‘zo nevez e kêr Iz,  
Mar de’ ken drant ar yaouankiz,  
Mar klevan-me ar biniou,  
Ar vombard hag an telennou ?

N’eus e kêr-Iz netra nevez,  
Rag ar festou-mañ ‘vez bemdez.  
N’eus e kêr-Iz nemed traou koz,  
Rag ar festou-mañ ‘vez bemnoz.

Bodennou drez ‘zo diwanet  
E dor an ilizou serret,  
Ha, war ar beorien o ouela,  
E laosker ar chas d’o drailla.

D’o c’hwezeg vloaz, an oll verhed  
N’o-deus Doue, ‘med ar pehed ;  
Ha, da ober e gurunenn,  
E roont o haerra rozenn.

Ahez, merh ar roue Grallon,  
Tan an ivern en he halon,  
Er penn kenta deuz an diroll,  
A drein d’he heul ar gêr da goll.

Sant Gwenole, gand kalonad,  
‘Zo bet meur ‘wech o kaoud he zad,  
Ha, gand daelou, an den Doue  
En-deus lavaret d’ar Roue :

« Grallon, Grallon, laka evez  
D’an dizurziou a ren Ahez :  
Rag tremenet ‘vo an amzer,  
Pa skuillo Doue e goler.

El leh ma oa c’hoarzedeg kent,  
E vo neuze skrignadeg dent,  
El leh ma oa kanaouennou,  
E vo klevet skrijadennou !... »

Hag ar Roue fur, spouronet,  
E verh en-deus bet kelennet :  
Mez, diskaret gand ar gozni,  
‘N-eus mui an nerz da stourm outi.

Ha, skuiz gand rebechou he zad,  
Evid mond deuz e zaoulagad,

Hi 'deus greet, gand droug-sperejou,  
Eur palez kaer tost d'ar skluziou.

Eno, gand he amourouzien,  
Ema fenez an abadenn,  
Eno, en aour hag en perlez,  
Evel an heol, e par Ahez...

« Plijadur deoh er palez-mañ,  
Merhed jentil ha paotred skañv,  
Plijadur deoh ha nozvez gren, »  
Eme eur Priñs, en eur antren.

Ar Priñs a zouge dillad ru',  
E varo 'oa hir ha du,  
E oll izili a verve,  
Hag e zaoulagad a zeve.

« Ra viot deut mad, estrañjour »  
Eme Ahez, gand eur beg flour,  
Ya, ra viot deut ar gwella,  
Mar anavezit an traou falla. »

Neuze em-bo degemer mad »,  
A respontas an divroad :  
« Rag me er fall 'zo ken desket  
Hag an hini 'n-eus her hrouet. »

Ha kerkent Ahez d'her pedi  
Da ober eun dro-zañs ganti,  
Hag an oll, a-eneb Doue,  
Gwasa ma hellent a doue.

*(Notenn gand "Embann an Hirwaz" : Hervez Daniel Bernard, an hini e-doa roet al leor da levraoueg Skol-Veur Vrest, e vank pennadou amañ.)*

Pa oa fin d'ar sakrilejou,  
Mesajer an droug-sperejou,  
Chomet e-unan er palez,  
A dostaas da gaoud Ahez :

« Va douisg koant, merh da Hrallon,  
Ha muia-karet va halon,  
Ha n'hallfen-me ket e neb giz  
Gweled alhwez skluziou Kêr-Iz ? »

« Va zad a zoug en e gerhenn,  
An alhwez aour deuz eur chadenn,  
Ha va zad bremañ 'zo kousket,  
Ha kaoud an alhwez n'hallan ket. »



Mez eñ d'he zreid en em strinkas,  
Ha d'he dornig flour a bokas,  
Hag he chalmas dre e zellou  
Karget a dan hag a zaelou.

Heb goud ar pezh a dremene  
Neuze, eur pennad ahane,  
En e balez, ar Roue koz  
A oa kousket e-kreiz an noz.

Kambr paour Gralon ne oa enni,  
Netra nemed eur grusifi  
Deuet a zorn eur mignon ker,  
Sant Kaourantin, Eskob Kemper.

Netra nemed eun Aviel,  
Roet c'hoaz gand eun den santel,  
Roet dezañ gand Gwenole,  
Evel eur merk a garante'.

Kaer en e gozni, 'vel eun Êl,  
E kouske Roue Breiz-Izel,  
Hag en-dro d'e dal, e vleo gwenn  
A ree, dispak, eur gurunenn.

Neuze, Ahez, ar Briñsez fall,  
Evel pa vije skoet dall,  
En e gambr, heb aon rag Doue,  
A deu da laerez an alhwe'.

En eur vale, war beg he zroad,  
Ar verh a dosta skañv d'he zad,  
Ha goustadig, deuz e gerhenn,  
E tenn, 'n eur hoarzin, ar chadenn.

Piou a deu du-hont gand ar ru,  
Pignet war eun inkane du,  
Ha d'an daou lamm war e gein,  
Ken a strink an tan deuz ar vein ?

Hennez eo mesajer Doue,  
Degaset en Iz d'ar Roue,  
Hennez eo abostol ar Feiz,  
Sant Gwenole, karet e Breiz.

Tostaad a ra 'n eur haloupad,  
En e zorn dehou e vaz Abad,  
Hag eur stol aour war e zae wenn,  
Hag eur helh tan en-dro d'e benn.

'N em gavet e dor ar palez  
En hini<sup>18</sup> e kousk tad Ahez,  
Diwar e varh, an den santel  
A halv, en noz, a vouez uhel :

« Gralon, Gralon, sao heb dale,  
Sao evid heulia Gwenole,  
Sao evid tehed deuz ar mor :  
Skluziou Kêr-Iz a zo digor ! »

Hag ar Roue koz, trubuillet,  
Er-mêz e wele 'zo saillet :  
« Din-me, din-me, va marh primma !...  
Siwaz ! Peurgollet ar gêr-ma' !... »

Ha gand glahar, e berr amzer,  
E kerz da heul e vignon ker,  
Ha war o lerh, en eur yudal,  
E klevont ar mor o ruillal.

Neuze ar Briñsez dirollet,  
He amourouz ganti kollet,  
Dre gêr Iz, a-gleiz hag a-zeho',  
A rede, dispaket he bleo.

Mez pa gleo daoulamm ar hezeg  
A-raog ar mor o teredeg,  
Dre al luhed, gand nehamant,  
Eh anave' he zad hag ar zant.

« Va zad, va zad, ma em harit,  
War ho marh skañv va hemerit » :  
Hag heb respont, an tad tener  
A zav e verh war an tailler.

Kerkent ar mor a vuanna,  
Ha Gwenole, en eur grena,  
A gri : « Gralon, taol an diaoul-ze,  
Diwar tailler da inkane !... »

Koulskoude c'hoaz, leun a enkreuz,  
An tad a zalh ar beherez ;  
Mez ar sant a ra sin ar groaz,  
A deu hag a sko gand e vaz.

Kerkent, mestrez an droug-spered  
A ruill er mor braz fuloret,  
Hag e kleo, tost ar Roue koz

---

<sup>18</sup> En hini : E pini, er skrid orin.

Eur c'hoarzin skiltr e-kreiz an noz.

Mez, rentet skañvoh, hebdale,  
E saill prim da heul Gwenole,  
Hag e varh, gleb e beder harr,  
A lamm deuz ar mor d'an douar.

Da zao-heol, ar Sant ha Gralon  
A bigne war lein Menez-Hom,  
An hini<sup>19</sup>, e dreid e-barz an trêz,  
A zao a-uz Douranenez.

Ahane, Roue Breiz-Izel  
War e lerh a daolas eur zell ;  
Mez, e leh Iz, gand he deg dor,  
Ne welas mui nemed ar mor.

« Eur gêr em-boea deuz ar gaerra,  
Ha setu-hi eet da netra !... »  
Hag e galon oll a fraillas,  
Hag e zaoulagad a ouelas.

« D'an daoulin », eme Gwenole, »  
Gralon, d'an daoulin ganen-me. »  
Ha Gralon, dindan e hlahar,  
A gouez d'an daoulin d'an douar.

Hag eno, dispak e vleo gwenn,  
Hag e dal pleget er boultrenn,  
E lavare c'hoaz ar Roue :  
« Ra vo bolontez Doue !... »

Pa zavas diwar e zaoulin,  
Dindan tan flamm heol ar mintin,  
E welas, a-dreuz e zaelou,  
O lugerni *Ru-Men-Goulou*<sup>20</sup>.

War ar mên-ze, on tadou-koz  
A skuille gwad d'eun Doue faoz,  
Hag ar Roue, e berr-amzer,  
A lavaras d'e vignon ker :

« Du-hont, e memor a gêr Iz,  
Me a ray sevel eun iliz,  
Hag evid testeni d'an oll  
M'he galvo Iliz Rumengol.

Pa vo an doueou maro,

---

<sup>19</sup> An hini : Pini, er skrid orin.

<sup>20</sup> *Ru-Men-Goulou* : *Rumengol*.

Ha kouezet meur a goad-dero,  
Eun deiz, deuz ar pevar avel,  
E teuy di, pobl Breiz-Izel.

**Kanaouenn goz**  
**KOAD-ELEZ**

I

Pach ar roue a lavare  
E Koad-Elez pa arrue :  
« Deiz mad ha joa oll en ti-ma’  
Merh Koad-Elez, peleh ema ?

« M’edi<sup>21</sup> du-ze ‘barz ar gambr wenn  
O titira al lien gwenn ;  
O tistenna al lien gwenn  
Hag o kribad he bleo melen  
Dirag he melezour arhant ;  
Ne deo na vil-daill na digoant.

Pach ar roue ‘vel ma klevas,  
Gand ar viñs d’an neh a bignas,  
Gand ar viñs d’an neh a bignas,  
Kerkent d’an traoñ a ziskennas :  
« Ne deo ket houmañ a glaskan,  
Merh Koad-Elez, ar verh henañ ;  
Ar verh henañ a Goad-Elez,  
‘Oa chomet amañ minorez. »

« Mar deo hounnez eo a glasket,  
Falla maouez ‘zo a gavfet.  
Eet eo abaoe beure-mad  
D’al lenn da walhi he dillad ;  
Tier broz seiz gwenn he-deus saotret  
O redeg gand he galanted. »

« Ma ouijen-me an hent d’al lenn,  
Me ‘amprouje ar femelenn. »  
« It gand an ale hed-ha-hed,  
E-barz ar hoad en em gavfet.

Ha pa vefet arru er hoad,  
C’hwi a glevo trouz ar pez-koad<sup>22</sup>,  
C’hwi a glevo trouz ar pez-koad,  
Ganti o skei war he dillad. »

II

« Deiz mad, plahig diwar al lenn  
C’hwi a gann gwenn hag a wask stenn.  
C’hwi a gann gwenn hag a wask stenn,

---

<sup>21</sup> M’edi :Ema

<sup>22</sup> pez-koad : golvaz.

C'hwi 'zaoñfe<sup>23</sup> din-me va brondenn ? »

« Ne gannan gwenn, ne waskan stenn,  
Ne zaoñin ket deoh ho prondenn. »  
« Sellit ouz va mantell ru'  
A zo alaouret en daou du ! »

« Ne ran van euz ho mantell ru',  
Mui 'ged ne ran euz or burlu. »  
« Sellit ouz va inkane gwenn  
'Zo eur brid arhant en e benn ! »

« Me ne ran van euz ho marh gwenn,  
Ken nebeud 'ran euz e berhenn ».

« Deut-hu ganen e-barz ar hoad  
Ha me 'laro deoh eur gomz vad ! »

« Vidon da veza er stivell,  
Va gwad a zo a ouenn uhel.  
'Vidon-me da veza kannerez,  
Va zad a chom en eur palez.

Me 'm-eus eur breurig e pell bro,  
Aotrou, ma klevje ho komzo',  
Ho tvrammje a behadou  
Da lakaad war ar hroazheñchou. »

« N'anavezeh ho preurig ker  
Pa'z eas-eñ kuit euz ar gêr ? »  
« Me 'oa yaouankig em havell  
Pa yeas va breur er broiou pell ! »

« Me eo ho preurig a bell bro  
'Zo deut amañ 'vid hoh ampro'.  
Va lez-vamm din he-doa laret,  
E oah plah fall, ha ne doh ket ! »

Gouelet en-divije an den  
O weloud e-kichenn al lenn  
Ar breur o vriata e hoar  
Gand daelou ha levenez-bar.

---

<sup>23</sup> C'hwi 'zaoñfe : C'hwi 'walhfe.

**François Le Scour**  
**AR BARZ**

Brao 'vez klevoud an alhweder,  
Bep bloaz, war zistro miz ar bleuniou,  
O sevel, gand e gan seder,  
Uhel-uhel war-zu an eoniou<sup>24</sup> !  
Seul-vui ma sao, seul-vui e vouez  
A deu hekleo beteg an dunienn<sup>25</sup>,  
Heb rankoud, dre skuizder, paouez  
Da gana, pa fell dezañ diskenn.

Brao 'vez klevoud war e vodig ;  
Kuzet dindan an deliou kelvez,  
Da viz an neiziou, an eostik  
O kana d'al loar e zon nevez :  
Chom a reer d'her selaou souezet,  
Kan na greder ket tenna 'n alan,  
Gand aon na nijfe kuit spontet,  
Ma klevfe trouz, an evnig bihan !

Brao 'vez klevoud an durzunell  
En hañv, pa vez sioul war ar mêziou,  
Oh ober, heb galloud tevel,  
Kañv he far dre galz a hirvoudou  
N'ouzon penaoz en or halon  
En em zil goustadig he glahar,  
'Vel pa vefe eun droug gwirion  
A deufe d'on lakaad dilavar !

Brao 'vez klevoud, 'hed an draonienn,  
Ar waz er hoad dindan ar broustou,  
Pa voustrouz dihoant o tremen  
'Vid kas d'ar mor braz he dourigou<sup>26</sup> :  
Skwer a ro dim deuz ar vuhez  
An hini<sup>27</sup>, goude tremen er bed-ma',  
En em skuill er maro bemdez  
Bepred digor evid he lonka !

Brao 'vez klevoud ar hurunou  
En oabl, e-padan arnev, o kroza,  
Pa deuont, dindan o zarzou,  
Da lakaad an douar da grena :  
Degas a reont dim eñvor`  
Eun Êl, pa deuy, deiz ar varn haro,  
Gand he drompill, da derri 'n nor  
Prennet war beziou an dud varo !

---

<sup>24</sup> eoniou : an neñvou.

<sup>25</sup> an dunienn : an dorgenn.

<sup>26</sup> dourigou : douriouigou.

<sup>27</sup> An hini : Pini, er skrid orin.

Brao 'vez klevoud trouz ar mor don,  
Pa red d'an tornaod gand al lano,  
'Vel eur marh gouez leun a spouron  
O vond d'ar red ruz dre 'r gwaremmo' :  
Kredi refeh klevoud Morgan,  
Dreist mouez ar gwagou foll, d'ar zadorn,  
Pa vouda mond d'o hoan  
D'he hannerezed, gand he bigorn !

Mez turzunell hag alhweder,  
Eostik ha gwaz, mor ha kurunou,  
Darn ane<sup>28</sup> o-deus eun amzer  
Hepken, evid kana o zoniou ;  
Darn all n'o-deus nemed eur yez  
Evid rei, beb-eil-dro, o hentel,  
Ha c'hoaz e teuont aliez  
An eil pe egile, da devel !

O ! ma vefe eur vouez bennag  
E-touez ar re a gan er bed-ma',  
Eur vouez gallouduz ha distag  
A ganfe bepred heb ehana !  
Eur vouez he-defe dibabet  
Ar pezh 'zo brava en oll moueziou,  
Pebez dudi e vez klevet  
Anezi o kana dim he gwerziou !

Mad ! me 'anav eur vouez dispar  
He-deus an dibab-se ker c'hoantet !  
Eur vouez hag a laka, pa gar,  
An oll da chom d'he selaou, bamet !  
Gand an eostik e oar trida,  
Ha gand an durzunell hirvoudi,  
Ha gand ar mor braz trouz-kroza,  
Ha gand ar waz vihan krozmoli.

Klevit ar Barz war an dorgenn,  
Eb disheol e zervenn azezet,  
O tihuna gand e delenn  
An hekleo er haviou morgousket !  
Pignet a spered en eoniou  
Evid deski yezou an êle',  
E kan bremañ meuleudiou  
A-greiz kalon d'an Aotrou Doue.

N'e' ket hepken ano Doue  
A gan, a ziskan war e delenn,  
Aliez eh espern ive'

---

<sup>28</sup> ane : aneze



Evid an traou krouet eur gordenn ;  
Klevit Osian a Vreiz-Veur  
O weled e genvrezelidi,  
'Vel eur breur war bez e vreudeur  
Beuzet en eur mor a velkoni. !

Pa deu an avel da folla,  
E venn o hlevoud er gorventenn !  
Pa deu an neñv da goumoulla,  
E venn o gweloud er goumoulenn !  
Pa chilp ar chas er radenneg,  
E vez klemm o anaon truezuz  
O houlenñ outañ an abeg  
Ma e' dizehet o breh nerzuz.

Mez setu amañ eur vouez all !  
Eur vouez gouez, ma oe kammed nikun !  
Eur vouez na gri 'med d'an tangwall !  
Eur vouez pounner evel ar gurun !  
Diwar lein ar menezioù du,  
Gwinc'hlan a daol e skrij d'an avel,  
'Vid ma vo kaset a bep tu,  
Da skuilla er vro eur spont marvel !

A-wechou e tiougan kelou,  
Pell a-raog ma kleont degouezoud,  
Deuz ar brezel, ar bosennou ;  
Ma ro d'ar bobl oll aon hag hirvoud !  
A-wechou all, deuz toull e zor,  
Eh heskin, gand e gorn, d'an emgann,  
Oll vrezelerien an Arvor,  
Kouër, floh, marheg, braz ha bihan.

Mar spont Gwinc'hlan war Menez-Bre,  
Gand e vouez yen evel ar zon-hlaz,  
Riwal a hourdrouz didrue'  
'Vel eur frao gwintet war Roh-Ellaz !  
Ahane e vombard skiltruz  
A daol he malloz d'ar parroziou  
En em gav tro-war-dro d'e guz,  
Ma ne reont ket hervez e gomzou !

Adaleg Lomikêl-an-Trêz  
Beteg Plougasnou, deuz eur hoste',  
Ha deuz eun all, bete Tredrez,  
En eur gana eh ee da vale ;  
Hag ar vro a zalh eñvor c'hoaz  
Penaoz, diwezad o tistrei,  
Eun devez e kavas, siwaz !  
Ar marv, o koueza en eun toull-blei'.

Mez petra ran-me koulskoude,  
O chom keid amzer da huñvrea  
War dud n'emaint ken en buhe'  
Abaoe ouspenn triweh-kant vla<sup>29</sup> ?  
Bremañ n'eus nemed Yann-ar-Gwenn  
A vefe teurniet war o danve',  
Ha c'hoaz e' raouiet e deleenn,  
Dre m'he-deus re zonet marteze.

O ! ma vefe c'hoaz en on touez  
Eur vouez hekleo a vouez ar Varzed !  
Eur vouez a rofe a-nevez  
Nerz ha buhez d'o moueziou mudet !  
Me a bedfe, war ma daoulin,  
Nep piou bennag en-deus ar vouez-se,  
D'he lakaad da gana mibin  
Ar barzoneg a ganent neuze.

Meuleudi 'ta d'ar Vreizadiz  
A zalh o banniel stard hag uhel  
'Eneb darn euz o henvroiz  
A ra fae war gwerziou Breiz-Izel !  
Meuleudi d'ar re a laka  
O spered da ziskouez d'an dud-se  
Penaos ma oar Bro-Hall kana,  
Emberr, Breiz hallo her goud ive' !

---

<sup>29</sup> vla ; vloaz.

**Pierre Huon ( ? )**  
**KAN AR GOUKOUG**

Piou ‘oa er park, Yann ha Gwillou,  
Tost dezo e kanas ar goukou’.

« Ar goukoug ! eme Gwillaouig ;  
Va bennoz a ran d’he mouezig.

Evidon-me he-deus kanet ;  
Ar hentañ em-eus he hlevet. »

« Tra ! tra ! eme Yann, ‘va mignon,  
‘Deus kanet nemed evidon ;

Hebdale on e soñj gwerzo<sup>30</sup>  
Va ouner zu, hag e vezo ! »

« Petra ‘lavarez, koz arloup ?  
Serr da veg gand da ouner loup !

Evidon, evid va Janet,  
Me ‘oar ervad he-deus kanet ;

Da Jan em-boa c’hoant dimezi,  
Bremañ e timezin dezi.

Mil ha mil bennoz tro-war-dro,  
D’ar goukoug hlaz a gan er vro ! »

« N’e’ ket te a vo dimezet,  
Ma ouner eo a vo gwerzet. »

« C’hoant ah-eus, paotr, d’am dihekal<sup>31</sup>  
Tredir ! an dra-mañ a dro fall ! »

« Mar dro fall, evidout-te ‘vo !  
Koz tamm-ludu ! me da zavo ! »

Eun denig koz o klask e voued,  
O vond e-biou ‘n-eus klevet.

« Mar fell deoh, paotred, va zelaou,  
Me ‘laro deoh eur ger pe zaou.

Heb gouzoud petra c’horvez ganeoh,  
It da gavoud barner ar peoh. »

---

<sup>30</sup> gwerzo : gwerza (evid ar rim).

<sup>31</sup> dihekal : faea.

« Deom eta d'e gavoud timad ;  
Eñ a renko on dra-ni mad. »

En eur gambr vraz leun a baper,  
Tost d'an daol edo ar barner.

En eur gador 'oa azezet,  
Hag eñ sarret<sup>32</sup> ha sonn meurbed.

Eur boned du klok war e benn ;  
Dindan e voned e vaoutenn ;

Hag hi paket e-giz eur fouet,  
Ha druz d'ober c'hoant d'ar razed.

N'e' ket red lavaroud penaoz  
'Oa war e fri lunedou koz.

« Deiz mad deoh-hu, barner ar peoh ;  
Ha mad atao ar bed ganeoh ? »

Tud yaouank, evel ma welet ;  
Mez koulskoude yac'hoh on bet. »

« D'ho kavoud on-daou om deuet,  
Evid petra ? Ne ouzoh ket. »

« Lavaret din, ha me 'ouio ;  
Ha gwell ma hellin, me 'raio «

« Ni 'zo deut d'ho kavoud on-daou,  
Da houzoud ar gwir hag ar gaou. »

« Ar gwir hag ar gaou a ouier  
P'am-eus komzet, an dra 'zo sklêr. »

« Ma ! ni 'oa deh, e-tal al lann,  
Tost d'ar roh, o troha balan ;

Ha setu raktal ar goukou'  
'N-eus kanet evidon, aotrou. »

« Evidon eo, gaouier divez :  
N'hen hredit ket, va aotrou kêz. »

« Peoh ! peoh 'ta ! paotred araouïz,  
Na rit ket kemend-all a drouz ;

Na gounnarit ket kemend-all,

---

<sup>32</sup> sarret : poelleg.

Pe me ho kaso kuit raktal.

Komzit an eil ouz egile ;  
Pe a-hend-all, it da vale :

Red eo d'eur barner klevoud mad,  
Evid barnoud goude ervad. »

Pa oent bet eta selaouet  
O-daou, evel ma oa dleet :

« Bremañ, paotred, 'raog mond pelloh,  
Eun draig a larin-me deoh :

« Taolit aze daou bez daou skoed,  
Hag ho prosez a vo barnet. »

Ha setu arhant war an daol,  
Hag ar barner d'e skrapa oll.

« Klevit eta ar wirionez, »  
Emezañ, o sevel e vouez :

« N'e' ket evid Yann na Gwillou,  
'Vidon 'n-eus kanet ar goukou'. »

Hag o vond kuit, i a lare :  
« Kanet 'n-eus evitañ ; gwir e'. »

Kanit, kanit, koukou', beb bloa' ;  
Ha c'hwi, tud sod, lipet ho loa. »

**Son goz.**

**KIMIAD D'AR YAOUANKIZ**

Disul da noz diweza, ha pa oa koaniet din,  
Ha me mond d'am liorzig,  
O ye, tra la, la.  
Ha me mond d'am liorzig,  
Da zelaou kan eun ein<sup>33</sup>.

Ha me kleved an eostik ouz ar bod o lared :  
Pe te 'zo klañv a galon,  
O ye, tra la, la.  
Pe te 'zo klañv a galon,  
Pe te 'h-eus poan spered.

« Me ne don klañv a galon, n'em-eus ket poan spered ;  
'Med gand keun d'am yaouankiz,  
O ye, tra la, la.  
'Med gand keun d'am yaouankiz,  
N'ouzon peleh eo eet.

Ma dent a zo eet gantañ<sup>34</sup>, ma bleo en-deus<sup>35</sup> gwenneet,  
Tortet en-deus ma diouskoaz,  
O ye tra la la  
Tortet en-deus ma diouskoaz  
Teñvalleet ma gweled.

Gwechall pa oan paotr yaouank, o vond d'ar pardonious,  
Arhant 'veze em godell  
O yê tra la la  
Arhant 'veze em godell,  
D'eva boutailladou.

Mez bremañ p'on dimezet, ha bet din paradur,  
Kenavo d'am yaouankiz,  
O yê tra la la.  
Kenavo d'am yaouankiz,  
Ha d'an oll blijadur.

Hogen te, evnig bihan, pa ah-eus askello',  
Kerz war-lerh ma yaouankiz,  
O yê tra la la.  
Kerz war-lerh ma yaouankiz,  
Ha degas hi en-dro.

Kerz war-lerh ma yaouankiz, lar dezi dond timad,  
Pa zegouezfom adarre,

---

<sup>33</sup> ein : evn.

<sup>34</sup> gantañ : ganti.

<sup>35</sup> en-deus : o-deus.

O yê tra la la.  
Pa zegouezfom adarre,  
Ni 'evo boutaillad !

« Na laosk-te da yaouankiz, pa'z eo eet en he zro !  
Na p'he-de' peder askell  
O yê tra la la.  
Na p'he-de' peder askell,  
Biken evn n'he zapo.

**Clec'h François-Marie (Montroulez 1788 – Kastell-Paol 1872)**  
**HUÑVRE AN DUK A VREIZ, YANN PEVAR**  
(Eur pennad tennet euz “Emgann Alre“)

Yann bevar, duk a Vreiz, en-devoa poan-spered ;  
E zellou a oa trist ; rag e galon vantret  
Ne ree mui joa ebed ; bepred oh hirvoudi,  
O weled an distruj e-touez e zujedi. Eun deiz, war fin an hañv, m'en-devoa greet d'ar red  
Ar rond euz ar gwardou a oa lakaet e ged,  
En em gavas ker skuiz, ker fêz, ma hoantaas,  
Dre ma oa pell outañ tud Charlez a Vleaz,  
Mond d'ober eur bale, da gemered an êr,  
En eur brouskoad, a oa eur pennad euz a gêr.  
Dre ze e lavaras d'e oll gompagnunez  
Hel lezel e-unan. Rag eun hanter devez  
En-devoa c'hoant da gaoud, da ziskuiza e benn,  
En eun tu a-gostez, dindan eun disheolienn.

Mired a reas hepken Goulc'hen, e floh fidel,  
Hag eur pachig yaouank, a oa anvet Primel.  
Ha c'hoaz n'o dalhas ket gwall bell en e gichenn.  
Pa oent arru a-dost, e komzas evel-henn :  
« C'hwi, va floh, emezañ, ha c'hwi va fach ivez,  
A chomo d'am gortoz, dindan disheol ar gwez.  
Hag a lakaad evez, ken n'am hlevfot o son  
Ton gwerz *Marheg Lez-Breiz*, a rin gand va hleron.

Neuze diwar e varh e tiskennas a-benn,  
E floh kenkoulz hag eñ a oe pront da ziskenn ;  
A dapas krog er brid ; hag an duk hel laoskas  
Hep selled war e lerh, diohtu en em dennas,  
Trist ha souchet e benn ; e-unan war e droad,  
A nebeud da nebeud ez eas e-barz ar hoad...

Ne oant ket flachet c'hoaz, pa glevjont a-nevez  
An deliou o trouzal a-dost e-touez ar gwez.  
Pa zelljont, e weljont eun dra bennag a wenn  
O vond euz ahano, evel eul luhedenn.  
Sklêrroh he gweljont c'hoaz o vond donnoh er hoad,  
Evel troad eun heiez a oa lijer he zroad ;

« Eur plah yaouank eo, eme ar pach Primel,  
Ar riskl n'eo ket braz, koulz eo deom he lezel. »

« Nann, nann, eme ar floh, na fiziom e netra,  
Petra 'ra dezi redeg ker buan ha ma ra ?  
Red eo deom he zapoud, rag aon am-be a-walh  
Na ve aze eur gwaz dindan dillad eur plah. »

Kerkent hag al lavar, pep hini en e roud,  
Ez ejom ar he lerh, da êsaad he zapoud.  
A-dreuz, dre ar brouskoad, ar floh a drohas krenn,  
Da dizoud en he raog, evid he diarbenn.  
Ar pach, primmoh a droad, a zoñjas mond d'ar red,  
Oh heulia he roudou, hag a-dreuz hag a-hed.



P'en em welas heuliet, ar plah he-devoe spont,  
He halon a lamme, ne helle pelloh mond.  
Koueza 'reas war ar yeot, chom eno e ranke,  
Krena 'ree he diouharr, he nerz dezi a vanke.  
A-benn ma arruas ar pach beteg enni,  
E oa he daoulagad dija o koavenni.  
He muzellou stignet, evel koar a oa gwenn ;  
Feson eun den maro he-devoa penn-da-benn.

Er stad trist-se edo, pa erruas Primel.  
Hemañ dija poaniet, en em lak da hervel :  
« Goulc'hen, deuit 'ta buan ! Ha n'eo ket eun druez ! »  
Eur plahig ker yaouank, dond da goll he buhez ! »

Goulc'hen, pa arruas, a zellas piz outi ;  
Ha da houd hag e talh he gwad da vomenti<sup>36</sup>,  
E tap krog en he breh. Eun hij a ra d'he fenn,  
Ha war he zal dija eo anad an anken !

En despet d'e gredenn, koulskoude e teu c'hoaz  
Da dapoud e gleze, ha d'e denna en noaz ;  
Lakaad a ra e blad a-dost d'he muzellou ;  
War an dir lugernuz 'liez e ra sellou.  
« Esperom, emezañ, petra bennag eo fall  
Va levnenn<sup>37</sup> a zo sklêr, hag eo deut teñval.  
Eur merk eo he-deus c'hoz eun nebeudig alan ;  
Semplet eo, mez he nerz a zistroio buan. »

Neuze euz e hodell e tenn eur vouest arhant,  
Ha dindan he difronn he lakaad eun istant<sup>38</sup>.  
Hag hebdale, ar plah a ra eun huanad.  
Eun nebeudig goude, digor he daoulagad,  
E ra eur zell en-dro, e seblant souezet,  
Evel eun divroad en eur hoad dilezet.  
Mez kerkent ha ma hell dond enni he-unan,  
E ra evel eul lamm, hag e sao ker buan.

Ne oe ket hir he soñj, rag diohtu e preder<sup>39</sup>  
Kemered eur penn-red etrezeg hag er gêr.  
En eur gemered lañs e ra eur zell a-gorn,  
Hag e welas Goulc'hen, eur hleze en e zorn.  
P'her gwelas o luha er-mêz euz e houin,  
E-leh mond kuit d'ar red, e kouez war he daoulin :

« Tadjentil, emezi, na vet ket didruez ;  
'N an' Doue, ma laoskit, ha ma list e buhez.  
Eun tad oajet am-eus, ha n'en-deus ken bugel  
Da zerri e lagad pa deuio da vervel ;  
Bet en-deveus a-walh a walleuriou garo.  
Va mamm a oe lakaet gand tud kriz d'ar maro,  
Ha n'eus pelloh chomet gantañ war an douar,  
Nemedon-me hepken da galmi e hlahar. »

Goulc'hen a oa glizeg, ha dija e zellou

---

<sup>36</sup> da vomenti : da redeg c'hoaz.

<sup>37</sup> levnenn : laonenn.

<sup>38</sup> istant : galeg : eur pennadig.

<sup>39</sup> preder : fazi : e pred.

A glaske sklêrijenn a-dreuz e zaerou.

« O ! merhig, emezañ, n'ho-pet ket a vorhed,  
Mar dougan-me kleze, n'eo ket evid merhed.  
Nag e vijeh eur gwaz, ha memez enebour,  
Biken en hoh eneb n'en-dije labour.  
Nemed c'hwi a vije armet mad penn-da-benn,  
En taill ha kreñv a-walh evid en em zivenn.  
Savit eta, plahig, ha n'ho-po ket a neh,  
Surroh evid amañ ne viot e neb leh.  
Mez evid kement-se, a-raog mond en ho roud,  
C'hwi ranko lavared, ha ni a ranko goud  
Piou oh-hu hoh-unan, piou eo ivez ho tad,  
Ha petra a glaskeh amañ e-barz ar hoad. »

A-wechou e weler eur gorventenn avel,  
E-kreiz an hañv kaerra, en eun taol o sevel.  
Dindan he fouez e pleg oll brankou ar wezenn,  
Ar bod a zo flastret, ha gweñvet e vleuenn.  
Mez ar memez arne an hini<sup>40</sup> hen diskare  
A zegas eur barr-glao, hag her zao adarre.  
Ar bod a zo dibradet, e zellou a zo glaz,  
Hag e voked a deu flammoh eged biskoaz.

Evel-se ar plahig, goude he spontadenn,  
Dre eur gomz a zouster a-berz ar memez den,  
En em gav dizoaniet. Al laouenidigez  
A zistro d'he halon, hag an hardiziegez.  
Kalm a zeu d'he spered<sup>41</sup> ; ha komzou d'he genou,  
Evid rei da Houlc'hen kont euz e holennou.  
Savet eo en he sao, ha gand eun êr laouen,  
Ouz an daou zijentil e komzas evel-henn :  
« Tudjentil, emezi, c'hoant hoh-eus da houzoud  
Piou eo ar plah dister a zo en ho kalloud ?  
Zaig eo va ano, hag amañ e-kichenn  
E choman gand va zad en eun tammig lochenn.  
Va zad, en e amzer, a oa den a vrezel ;  
Nann evel ma'z oh-hu, mez euz eur renk izel.  
Pa oa c'hoaz den yaouank, e servijas e vro,  
Dindan urz Yann drede ; ha goude e varo,  
Eh heulias bannielou ar Hont Yann a Vontfort.  
Kredi 'reas ober mad ; mez eun den euz e sort,  
A hell en em drompla, dre vank a sklêrijenn,  
Rag biskoaz ne ouias va zad skriva na lenn.  
Ha pa'z oh Bretoned, n'eus forz euz a bez tu,  
Pe da Yann a Vontfort, pe d'eun all e veh-hu,  
C'hwi 'zo pell ad zoñjal, euz se on asur mad.  
Dond da nehi ar verh evid fazi he zad.  
Mar hoh-eus c'hoant da houd petra 'oa a glasken  
Er hoad-mañ, pa oh deut ho-taou d'am diarbenn ;  
Eur vuoh am-oa diank, hag e oan oh he hlask ;

---

<sup>40</sup> an hini : p'hini, er skrid orin.

<sup>41</sup> Kalm a zeu d'he spered : galleg ; sioul e teu he spered.

Feulzet gand ar helien he-deus torret he nask,  
 Ha deut, en eur vreskenn a-benn e-barz ar hoad,  
 En hini<sup>42</sup> e ouie kaoud eun disheolienn vad.  
 Setu a-hed-da-hed aze ar wirionez.  
 Bremañ, mar plij ganeoh ez an kuit, Aotrounez.  
 An oabl a deu teñval, an deiz 'deu da dristaad,  
 Hag euz ar gornaoueg e welan o tostaad  
 A-eneb an avel eur pez koumoulenn zu,  
 Eur barrad glao-arn' em-eus aon or-bo diohtu. »  
 « Chomit, eme ar floh, eur momentig<sup>43</sup> hepken,  
 Ha livirit deom c'hoaz ha n'hoh-eus gwelet den  
 Pa oah er hoad o klask hoh aneval diank ? »  
 « Eo, emezi gwelet am-eus eun den yaouank.  
 Euz a ouenn tudjentil e kredan eo ganet.  
 Kaer eo wiskamant, ha kaerroh e gened.  
 C'hoant am-boia da gredi e welen eun Arhêl  
 A oe treh da Zatan pa eure ar brezel. »  
 « Peleh, eme Houlc'hen, e pe gorn euz ar hoad,  
 Ha penaoz, en eur ger, pe war varh pe war droad  
 E oa an den yaouank an hini<sup>44</sup> hoh-eus gwelet ? »  
 « War e droad, emezi, ha memez azezet.  
 Evid lavared gwell, e oa dindan ar gwez,  
 Kousket, harp ouz eur roh, a-damm en e hourvez.  
 A-dost da greiz ar hoad ez eus eur frankizenn,  
 Distlabez a geuneud, ha kreñv en e glazenn.  
 En eur horn anezi e weler eur bouill-dour ;  
 A bep tu gwaskedet, he horre a zo flour,  
 Ker sklêr ha ker skeduz evel lagad an naer.  
 Eur bladenn arhantet da weled a zo kaer,  
 Mez amliou ha teñval e ve en e gichenn,  
 Evel ma ve ar plomm e-tal an arhant gwenn.  
 An dour a gouez ennañ, evel beradou glao  
 Dre skalfou eur roh vraz goloet a ileo.  
 Dindan eur wezenn fao, e-keñver ar roh-se,  
 Ema an den yaouank, harpet war e goste'.  
 E vinviou brezel, pensoutet a hern<sup>45</sup>,  
 A-dostig e weler dastumet en eur bern ;  
 E hoaf hag e gleze, e skoed hag e chupenn,  
 E heuzou hag e dok, marellet e melen.  
 Doare 'zo e oa oll goloet a houarn  
 Adaleg plant e dreid beteg e ziouskouarn.  
 N'en-deus miret gantañ nemed eur goustill berr,  
 A-zindan e zorn dehou dalhet en e geñver.  
 Ha prest da zihouina, evel pa 'n-de disfi  
 E ve eur re bennag en c'hoant d'hen ataki.  
 E vreh kleiz 'zo pleget euz a-dreuz e ilin.  
 Lakaet evel eur peul a-blomm war benn e hlin.

<sup>42</sup> En hini E p'hini, er skrid o vraz goloetrin.

<sup>43</sup> momentig : galleg !

<sup>44</sup> an hini : p'hini, er skrid orin.

<sup>45</sup> pensoutet a hern : houarn en o beg.

Ha kouezet en daou du en-dro d'e ziouvougenn,  
Evel seiz alaouret, e teu e vleo melen.  
E benn war bal e zorn a zo gantañ laosket,  
Serret e zaoulagad, ez eo chomet kousket.  
O ! kaer eo da weled dindan e zisheolienn !  
E zioujod 'zo ker ruz ! e zaouarn 'zo ker gwenn.  
Kredi rafeh gweled diou rozenn podet koant,  
Fresk-beo kutuillet war eur plad olifant.

Chomet e oan a-bann da zelled piz outañ ;  
A-benn fin, gand ar vez, on deredet amañ,  
Ha pa 'm-eus ho kwelet, em-eus cheñchet a roud ;  
C'hwi hoh-eus bet redet war va lerh d'am zapoud.  
Buan dialanet, me 'zo be tizet prest.  
Setu ar pezh a onn<sup>46</sup>, goud a ouzoh ar rest. »  
« Ya, ya, eme C'houlven, ha ne houlennom ken ;  
It da glask ho puoh, ha n'ho-po ket aon rag den,  
Ma arrufe dre chañs eun den a zoare fall  
Da vond war-zu ennoh, n'ho-po nemed krial ;  
Ni on-eus c'hoaz eun dro da ober dre amañ,  
Hag a yafe buan evid kleved outañ... »  
Komz diwezañ ar floh a oa achu a-boan,  
Ma oa eet Zaik kuit, ker prim hag ar flamm-tan.

Koulskoude an arne a ya bepred war gresk :  
En neñv, gand ar hoabr ez eus kas ha kemmesk.  
Stank ha teo dreist-muzul, evel kreññiou gloan du,  
O gweler o tostaad, bountet euz an daou du.  
Ha gwasoh evito, e weled c'hoaz o tond  
A du ar gornaoueg, e furm eun hanter rond,  
Hir, pounner ha ledan, eur goumoulenn deñval,  
Kalz brasoh heh-unan evid an oll re all.  
Evel ma oa sammet euz a eur mor dour-glao,  
E tosta war he fouez, mez dond a ra atao.  
A-nebeudouigou, evel m'en em astenn  
An oad hag ar gozni beb momant war an den,  
E teu da zisheolia ar hontre tro-war-dro,  
Evel pa ve an noz o koueza war ar vro,  
En despet da ze oll hep trevell e ouezer ;  
Tomm evel en eur forn, ha bah eo an amzer.  
An deliou 'zo difiñv, an avel ne hwez ket ;  
Nag er hoad nag er-mêz ne glever trouz ebed.  
Tud hag anevaled o-deus meurbed a boan  
O kavoud êr a-walh da denna o alan.  
Ha pa deu bariou heol, etre diou goabrenn,  
A-blomm war an daouar a-wechou da dremen,  
Evel biriou goret, evel flemmou a dan,  
E tevont, e suillont kement a vez dindan.  
Mez hebdale e teu kalz a cheñchidigez ;

---

<sup>46</sup> onn : ouzon

Mui oh mui en amzer ez eus tristedigez.  
A-greiz m'ema sioulla ar hoad hag an avel,  
Eun trouz hir ha pounner a deu a-ziabell.  
A amzer da amzer e teu a-daoladou  
Korventennoù avel evel huanadou,  
Da lakaad ar brankou er gwez da luskellad.  
An avel-dro a skub, en eur droidellad,  
Ha poultrenn, ha deliou, kement-se war e hent,  
Oll e teu d'o renka a verniou a beb ment.  
An heol 'zo goloet, n'eus ken a sklêrijenn ;  
Ne weler ken Alre gand an deñvalijenn.  
Kreski a ra bepred an trouz hag ar voubou ;  
Anaoud a reer bremañ krozmol ar hurunou.  
Beb momant e tosta, ema eno hichenn.  
Ar hoabr a zigor, setu eul luhedenn ;  
Eklevi'ra ar hoad, hag an Duk a zihun.  
Santoud a ra poent, hag e tap e gleron.  
An daou zervijer mad he hleo buan o son.  
Ha diohtu ez eont o-daou en eur penn-red,  
Ha redeg a hellent, ne oant ket re abred.

An Duk o gortoze ; dija e oa savet  
A-benn ma oent eno gantañ en em gavet.  
« Hastit, eme an Duk, deut ho-taou d'am zikour ;  
Gwelet hoh-eus an tan, bremaig e vezo dour... »  
An Duk a zo gwisket ; ar hezeg 'zo en treiñ ;  
Ha ma o-deus an dud hast da vond war o hein,  
I n'int ket nebeutoh hastet da vale kuit ;  
Pilpazad a reont en eur chakad o brid...

Pa oa an Duk yaouank o sevel beg e droad,  
Prest dija d'e fourra er skleuk evid pignad,  
E teuas eur flamm-tan, hag er memez amzer  
Eun tarz seh a gurun, gand eun trouz ker pounner,  
Ma chomas en e zao evel ma oa pozet,  
Digor e zaoulagad evel eun den souezet.  
Ar hezeg spouronet gand an trouz hag ar flamm,  
Diohtu a reas o-zri war eun dro beb a lamm.  
O difronn 'zo digor, skoelf eo o daoulagad,  
O diskouarn 'zo en êr ker sonn ha re eur had.  
C'hwez ar soufr a glever, tost ez oar bouzaret.

E-kichenn e welont eur wezenn diskaret ;  
Divogedi a ra, a dan eo goloet ;  
Ar gurun o koueza, warni he-deus skoet.  
An amzer en eun taol ne deo mui ken klouar,  
Ar glao evel eur mor a gouez war an douar,  
Kemmesket a hrizill ar re<sup>47</sup> war an deliou.  
A glever o strakal er hoad war an deliou.

---

<sup>47</sup> ar re : a bere, er skrid orin.

« Ahanta, Aotrounez, ha c’hwi ‘oar peleh trei ?  
Eme an Duk yaouank, dour a ra hag a ray  
Er stankenniou bremañ e tle beza dour beun<sup>48</sup>,  
Gwelit an deliou seh, emaint dijan war meun<sup>49</sup> .

Mez n’om ket on-unan, kalz a dud all, heb mar,  
En em gav, koulz ha ni, tapet dindan ar barr.  
Setu arru du-hont eur plah en eur redeg  
A-benn-êr d’an amzer, krommet hag e daoubleg  
Ar baourez-kêz diod ! nag hi ‘zo dispered !  
Seblantoud a ra kaoud c’hoant da veza treuzet.  
Eur vantell ‘zo ganti, war he breh eo he doug,  
N’he-deus ket ar skiant d’he zeurel war he chouk. »  
« Zaik ! eme Brimel, daoust da beleh ez a ?  
N’oufe ket mond a-bell, ma red evel ma ra : »  
« Penaoz, eme an Duk, c’hwi a oar heh ano !...  
Bet oh c’hoaz war ar mêz, c’hwi ‘zo eur gwaz tano. »

Primel, en eur ruzia, a lavaras diohtu :  
« N’em-meus hi gwelet nemed a-raozoh-hu ;  
Biskoaz kent n’he gwelis nemed hirio hepken,  
N’em-eus komzet outi nemed dirag Goulven. »  
Goulc’hen, dindan e zouch a oa o vousec’hoarzin,  
O weled Primel gêz ruz ha krizet e vin...

E-keit ma oant c’hoaz o kaozeal,  
Zaik war-zu enno a zeu en eur grial :  
« Deut, deut, deut alese ganen, Aotrounez vad,  
Deut on beteg ennoh, degaset gand va zad,  
D’ho pedi euz e berz, mar prizit, da ziskenn  
Eun tamm da zishlavi e-barz en e lochenn.  
C’hoant en-deus e teufeh, kredi a ra goud mad  
Piou eo an denjentil a oa kousket er hoad.  
Ha m’en-dije gallet redeg beteg amañ,  
E teuje e-unan da bedi anezañ. »  
En eur drei ouz an Duk, e eras neuze kempenn  
Eur soubl d’he daoulagad hag eur stouig d’he fenn :  
« Dalit, emezi, Aotrou, kemerit ar vantell ;  
N’he-deus ket servijet da dud a renk izel,  
Da unan euz ho seurt ez eo bet en ho raog.  
E-barz en brid ho marh me ‘ya da zerhel krog,  
Hag ho floh e-keit-se a gemero soursi  
Da renka ar vantell, d’ho lakaad en abri...  
Oh bremañ, emezi, an daou zijentil all  
A hell kas o hezeg ha poania d’o diwall ;  
Mez evid hoh-hini me reno anezañ,  
Ha kement-se ‘zo din eun enor, a gredan. »  
En eur lavared se, Zaik a ya en hent.

---

<sup>48</sup> beun : beuzet.

<sup>49</sup> meun : neun.

« Yo ! emezi » ; ar marh outi diohtu a zent.  
An Duk, hag e zaou zen a zeue war he lerh,  
A vousec'hoarz o weled peger beo eo ar verh.

En eur beg euz ar hoad a-zioh da eur bradenn  
Ez eus eun tamm frankiz, goloet a raden.

Eno 'z eus eur bochad a wern hag a bupli,  
Hag e-tal ar re-ze ez eus savet eun ti.

N'en deo ket eur hastell, eur maner kennebeud ;  
Euz a chomaj an dud n'en deo nemed ar skeud,  
N'en deo nemed eun toull, eun tammig loch bihan,  
Savet heb masoner, ha toet gand broann<sup>50</sup>.  
Ar mogeriou a zo brankou gwez kemmersket,  
Gand eur gwisk pri melen, evid rei ar gwasked.

Eur hroumel<sup>51</sup> en-dro-dro a ra moger ar porz,  
Eur harzad haleg moan, leun a gammigellou.

Di eo da Zaik gand he hompagnunez,  
Laouennoh ha kaerroh eged eur rouanez

A boan ema er porz, e kri war bouez he fenn.

« O ! va zad ker, emezi, euruz eo on lochenn,  
N'o-deus ket greet a fae, an tri dijentil mad ;  
Mar doh evid ruza, deut d'o degemeret. »  
An den koz p'he hlevas, a zibradas diohtu,  
E dok plouz en e zorn ; hag en e vaz spern-du  
E krog gand e zorn all, da zond beteg an nor :  
« Deut e-barz, emezañ, tudjentil a enor.  
N'em-eus da ginnig deoh nemed nebeud a dra,  
M'ho-po naon koulskoude, em-eus eun tamm bara ;  
Hag evid e drempa eur bannah lêz livriz ;  
N'eo ket gwenn va bara, mez eun tamm bara griz. »  
En eur lavared se, ha bepred diskabell,  
Ez a da greiz an ti, e kemer eur skabell ;  
Hag o trei ouz an Duk, e lavar c'hoaz dezañ :  
« Deut, emezañ, Aotrou, hag azezit amañ,  
Rag, en despet d'ho tremm, an hini<sup>52</sup> a zikouel  
N'ez eus ket pell amzer e oah c'hoaz eur bugel ;  
E welan sklêr a-walh, goude lakaad evez,  
Ez eo c'hwi ar henta euz ar gompagnunez.  
Eun êr a ouenn a vez ! c'hwi 'zo anaveab  
Da biou, euz ho feson, e rankit beza mab.  
Me gwechall aliez am-eus gwelet ho tad,

---

<sup>50</sup> broann : broenn.

<sup>51</sup> hroumel : eur peul-gae.

<sup>52</sup> an hini : pehini, er skrid oin.

Eveldoh en-devoa e veh a feson vad.  
Hag e vije redet pevar horn an douar,  
Na ouvjet birviken gweled nemed e bar.  
Ma ne oa ket a vent euz ar re uhella,  
E oa euz an dud kreñv, hag euz ar re wella,  
Na postet eveltañ, nag eveltañ frammet  
E-touez an dud yaouank gour ne vije kavet  
En eur gêr, eun den brao, ha greet mad penn-da-benn  
Ha sonn war e ziuoharr evel eur ganabenn<sup>53</sup>.  
Beo hep skañvadurez, prim a zorn hag a droad  
Skiltr a vouez, frêz a gomz, ha lemm e zaoulagad. »  
« Den mad hag hir-oajet, eme an Duk dezañ,  
C'hoaz ez eus tud fidel er bed, war ma welan.  
Gand anaoudegez vad em-bo soñj da viken,  
Euz an degemer mad am-eus en ho lochenn.

Azezom eur pennad on-daou en êr an tan ;  
Da hini ahanom kement-se ne ray poan ;  
An tan a dle plijoud da eun den deut d'hoh oad,  
Ha din-me e plijo da zeha va dillad. »

Pa glevas kement-se e teuas ar paotr koz  
Da goueza goustadig a-blomm war e bigos....

E-pad an amzer-ze ne vankas ket a gaoz  
Etre an Duk a Vreiz hag ar brezeler koz.  
An hini<sup>54</sup> 'gonte dezañ kalz a draou tremenet  
En e vro, pell amzer a-raog ma oa ganet...

Pa oe achu e gaoz gand ozah ar lochenn,  
An Duk yaouank de dro a gomzas evel-henn :

« Gand kalz a blijadur am-eus ho selaouet  
O konta gloar va mamm ha mez ar Hallaoued.

Mez kent evid hirio e klevis kaozeal  
Diwar-benn an traou kaer a hoarvezas gwechall.  
O hlevet am-eus oll, hag o gouzoud a ran,  
Me 'garre<sup>55</sup> goud kerkoulz ar pez a vo bremañ.  
Me 'garre e ve gwir eun huñvre am-eus bet  
Er hoad bremañ-souden, keit ha ma oan kousket. »

« Aotrou, eme ar gwaz, kemend a vadelez  
A ro din marteze re a hardiegez ;  
Koulskoude selaouit, eun den dister ho ped,  
Kontit, mar plij ganeoh, an huñvre hoh-eus bet. »

---

<sup>53</sup> ganabenn : eur skourr kanab.

<sup>54</sup> An hini : P'hini, er skrid orin.

<sup>55</sup> garre : garfe.



A-veh e oa ganen va malvennou serret,  
Ma teuas eun huñvre da vread<sup>56</sup> va spered.  
Seblantoud a ree din beza douget en neñv,  
Dreist ar vro a Wened, dreist ar vro a Gerne ;  
Ha beza degaset gand Êled askelleg,  
D'ar hontre a Leon avet an Elestreg<sup>57</sup>.  
Eno 'oen diskennet ganto e korn eur hoad,  
istraoñs d'am izili, hep kaoud na droug na brad<sup>58</sup>.  
A-dost eur wazad dour he-devoa he mammenn,  
A hesk hag a bendu<sup>59</sup> 'oa bordet penn-da-benn.  
A-zioh eun dervenn goz a astenne he skourr,  
Ha gand he deliou glaz a zisheolie an dour.  
Soñjal a reas din c'hoaz e welen a-gostez  
Eun dosennig douar, bomet<sup>60</sup> evel eur bez.  
Warnañ eur bod lili, savet en eun nozvez,  
Goloet a vleun kaer ha gwenn evel al lêz.  
War an deliou skeduz euz e vleun e weled  
Lizerennou gantañ war eun dro diwanet.  
En aour melen skrivet, war no 'oa o luzia,  
Ano kaer ha santel an Itron Varia.

Pep tra bete vremañ a zo sioul ha trankil,  
An dour a red didrouz, ha netra ne fistill.  
Ne hwez berad avel, hag er hoad tro-war-dro,  
An oll anevaled a zo evel maro.

Ne glever ket eur paz, ne glever ket eur yez.  
Mez, en eur zerr-lagad, pebez cheñchedigez !  
Kredi a ran santoud gand nerz ma luskellad,  
Gweled a ran war-dro ar gwez oh horjellad.  
O gwrizioù euz o flas oh en em ziranna,  
Hag o douar o vond d'o heul heb didamma.  
Gand spont, al laboused en-dro-dro a hournij,  
Hag an douar broustet, gand trouz braz en em hij.  
E vomou a zave, a ruille ken euzuz,  
Ha gwagou ar mor don en eun deiz arnevuz.

Goude kemend a drouz ha kemend a drefu,  
E chom sioul adarre ar hoad oll a bep tu.  
Mez pep tra a zo cheñchet : ne weler mui ar gwez  
Evel ma oant a-raog, direnk hag a-sklabez.  
En daou benn, en daou du, int lakaet a-regenn,  
Hag e-kreiz e weler kompezenn eur blênnenn,  
Evel tachenn eur gêr, a vein c'hoaz dibourvez,  
Pe 'vid lavared gwell, evel eul leur-nevez.

---

<sup>56</sup> da vread : da skuiza.

<sup>57</sup> Elestreg : ?

<sup>58</sup> brad : ?

<sup>59</sup> bendu : pendu : marteze elestr.

<sup>60</sup> bomet : ? (savet).

Kemend a vurzudou am greet souezet.  
Mez adarre eun taol !... Setu-me spouronet  
Gand eur strakl a glevan tost a-zioh d'am penn,  
Evel trouz ar gurun o koueza em hichenn.

Kredi 'ran eo kouezet gand stroñs euz an neñvou ;  
Mond a ran d'an douar, a-blad war va genou.  
War va horv koulskoude netra n'en-deus pouezet ;  
Hag evid an eil gwech an trouz 'zo paouezet.

Divadet euz va spont gand ar sioulidigez,  
Da zelled en-dro din am-eus hardiezidigez.  
Mez nag a draou cheñchet en eun taol adarre !  
N'ez eus chomet netra en eun taol adarre !  
N'ez eus chomet netra en eur memez doare.  
Eun iliz ar gaerra, a oe biskoaz savet,  
En dachenn abaoe a zo en em gavet.  
Kaer e oa an danvez, ha kaerroh al labour,  
Selljeh ouz an iliz, pe 'zelljeh ouz an tour.

Eur metal bet er forn dre hir amzer goret,  
Teuzet gand an tommder, tano evel dour-red,  
Ha taolet en eur moull, da gemered e stumm,  
Peger koujourn bennag ma rank en em zastum,  
N'en em brest ket gwelloc'h da hoant ar micherour,  
Ne ra ket a blegou na ker soubl na ker flour,  
Evel ma ree eno ar benerez<sup>61</sup> kaled  
Gand eun dorn burzuduz en eun taol kizellet.  
An dorjoud a oa gwarniset tro-war-dro  
Gand mouleuriou kleuzet kondon er vein garo ;  
Ha tallet ker kempenn, ha labouret ker fin,  
Ma kredjeh e vijent deliou eur bod rezin.  
Ar prenecher toullet gand kemend a evez  
Ma seblantont trehi ar haerra dantelez.

Ker souezet e oan gand ar pezh a welen  
Ma oan euz a leh all dizoñj a bep tra krenn.  
Savet e oan em zav, ha ne ouien doare  
Nag en petore soñj, nag en pe da vare.  
Koulskoude pell a oa ne oan ket gourvezet ;  
Dibrad euz an douar, e reen tro ar vered.  
Erru e oan war-eeun a-zirag an nor-dal,  
Pa glevis a-greiz-oll he frennou o strakal.  
Diohtu e tigoras, frank hag entre daou bez ;  
Kement a oa e-barz neuze a welis frêz.

Nag a draou burzuduz, a welis-me enni,  
A bep tu, kreh ha traoñ, oll o steredenni !  
Leun e oa a sklêrder ; hag Êledigou gwenn

---

<sup>61</sup> ar benerez : ar mên bet benet.

A oa enni e-leiz, war-neun ar sklêrijenn.  
Darn o daouarn joentret, ha kroazet gand darn all ;  
War o diouaskell aour tro-dro oournijal.  
O horvou 'oa ker sklêr,ma weled o skedi,  
Ar sklêrijenn a-dreuz bdre o oll izili.  
O dremmou ker skeduz, hag o zellou seder  
A zalhent gand evez troet ouz an aoter.

Me a droas ivez en tu-ze va zellou ;  
Mez kerkent e rankis serra va malvennou.  
Nemed a-nebeudou ne hellis dond a-benn  
D'ober va daoulagad ouz ar pez a welen.  
Eun itron ar gaerra a welen azezet  
En eur gador skeduz dreist ar skiltra stered.  
Ne vije netra krenn oll sklêrijenn al loar,  
Red e vije d'an heol diskenn war an douar,  
Gand ar mor a sklêrder a skuill euz e flammou,  
Evid diskouez hepken eur skeud euz ar bannou  
A zo o rodella renket en-dro d'he fenn,  
Hag en-dro d'eur bugel war he barlenn.  
Ne oa ket eun daolenn, greet gand dorn eul liver,  
Ne oa ket furmou tud, greet gand dorn eur skulter,  
A welen-me eno dirag va daoulagad ;  
Mez tud leun a vuhez, eveldon, kig ha gwad.

Hebadle, an itron a zao diwar he lez,  
Gand muioh a hras vad evid eur rouanez.  
Eur gouel seiz ar haerra, brodet en aour melen,  
A oa taolet distad dreist he horv penn-da-benn.  
Ar gouel a oa ehon, a vleun aour stlabezet,  
Evel an oabl, pa vez goloet a stered.  
Lost he sae a leze da dreina war he lerh,  
A-zindan e weled eur zae all liou an erh.  
Gand eur blañsonen aour, ridet war he herhenn ;  
Hag eur gouriz heñvel ouz eur ganevedenn,  
Evelti, briz a liou, hag evelti skeduz,  
A starde he horv mistr, gand eur blouk lugernuz.  
Stouet he daoulagad ne zelle e nebleh ;  
He hrouadur yaouank a zalhe war he breh.

Doned a ree a-raog ; kerkent ha ma flachas,  
Eun tarz lourd a gurun en-dro dezi a strakas.  
An t.an en eur vouga a lez eur vogedenn,  
An hini<sup>62</sup> dindan he zreid, a ra eur hoabrenn.  
Pa zantisEur foul vraz a Élez a erruas buan  
Gand laouenedigez d'en em zila dindan.  
Gand he daouarnigou ha beg he diouaskell,  
Dibrad euz an douar e teuent d'he derhel.  
Ha war he hoabrenn evel-se eo douget

---

<sup>62</sup> An hini :P'hini, er skrid orin.

War-zu traoñ an iliz gand o mamm venniget.  
Êlez a oa en-dro. Êlez a oa a-raog.  
Stank e oa o renkou ken e oant stok-ouz-stok.

Dreist an oll Êlez all, unan a oa er penn ;  
Seblantoud a ree greet evid ar gourhemenn.  
Euz eun Êl n'en-devoa nemed an diouaskell,  
A-hend-all e touge stumm eun den a vrezel,  
Eun tok aour lugernuz a holoe e benn ;  
E gleze en-devoa eur flamm-tan da laonenn.  
War e lerh e teue an oll gompagnunez.  
An oll Êlez dija a gane en eur vouez,  
Gand pep seurt muzikou eur hantik dudiu  
En enor da Vari ar Werhez hloriu.  
Hag er hoad, tro-war-dro, al labousedigou

Evel-se e teujont bete kreiz an nor vraz ;  
Eno ar goabrenn heb fiñval a chomas.  
An Itron gand he dorn a reas eur zin en êr.  
Ar zin-ze gand an oll a oe intentet sklêr.  
Hag an oll muzikou a davas assemblez ;  
Eur momant e bep tu e oe sioullidigez.

En eur-ze da genta e teuis da anaoud  
E oa Mamm va Zalver a zeue d'am havoud.  
Pa zantis kement-se ne hellis ket herzel  
Ouz nerz va harantez ha va doujañs santel,  
Trehet gand ar respet a garge va halon,  
E kouezis d'an daoulin oh harz treid an Itron.  
Gortoz a ris eno, hep sevel va zellou,  
Ar gomz a oa dija prest war he muzellou.

« O ! Yann a Vreiz, emezi, bete barr an neñvou  
Ez eo pignet ar vouez euz hoh huanadou !  
Paouezit da ouela, sehit ho taoulagad,  
Amañ hoh-eus eur vamm, en neñv hoh-eus eun tad.  
Doue diwar e lez eternal ha doujet,  
Dirag an hini<sup>63</sup> e kren an Êlez venniget,  
En-deus prizet, dre nerz e zorn oll-hallouduz  
Aotreet ho mennad d'ho pedenn hirvouduz.  
Euz e berz e teuan, da stanka ho taerou,  
Ha da rei a-benn fin eun termen d'ho poaniou.

Deoh e vo ar gounid war hoh enebourien ;  
Breiz oll deoh a blego, ha d'hoh heritourien ;  
E-keit ha ma Breiz e niver ar stadou,  
Evel m'he-deus pleget 'hed eur wech d'ho tadou.  
Mez a-raog kement-se eun emgann a vo c'hoaz,  
E weled a refet a-benn an noz warhoaz.

---

<sup>63</sup> an hini :p'hini,er skrid orin.

Gweled a rit amañ an Arhêl sant Mikel.  
Armou eur brezelour a holo korv an Êl.  
Euz a Êlez an neñv hennez eo ar penn ;  
Pa reont ar brezel, hennez a hourhemenn.  
Warhoaz war an douar e vo berzet e houel,  
Ha warhoaz e halloud a dle en em ziskouel.  
Warhoaz en em ganno eun eur a-gostez deoh,  
Ho-pet eta kalon, biken koll na oufeh.

Hogen prestig ho skouarn, ha klevit gand evez  
An urzou a ro deoh bremañ ho rouanez.

Eur bez fresk a welit en or hichenn amañ,  
Eur servijer din-me a zo lakaet ennañ ;  
Evid eru zod e oa kemeret gand an oll.  
An ano en-devoa a *Zalaun ar foll*,  
Euruz ar re 'vo foll evel ma oa hennez !  
Rag en e follentez ne oa nemed furnez.  
E galon a oa pur, e ene a oa flamm,  
Kared a ree Doue hag ar Werhez e Vamm.  
En e vuhez eo bet disprizet en e vro,  
Mez e hloar a vo braz pell goude e varo.  
Falvezoud a ra din, ha da Zoue ivez  
E ve savet amañ eun iliz war e vez.  
Evid ma vo bepred meulet ano Mari  
El leh ma tizas keid ar foll heh enori.

C'hwi, pa viot e peoh, perhenn a Zukach Breiz,  
Pa vo hoh oll ouzrien kontreign da veza reiz,  
A lakaio ober ar pezh a houlenan.  
Ha grit an iliz-se heñvel-beo ouz houmañ.  
Emedi ar patrom dirag ho taoulagad ;  
Dre eno diskouezit hoh anaoudegez-vad.  
Ha me, euz va hostez a vo trugarezuz  
E-keñver an duk Yann hag e bobl truezuz.

Ya ! *Mari ar Follgoad* a vo anavezet,  
Dre he burzudou kaer e Bro-Vreiz hed-ha-hed. »

Amañ dindan va zreid an douar a grenas,  
Hag a-zioh d'am penn ar gurun a grozas.  
Gand ar spont strafuillet, diohtu e tihunis,  
Hag evel en eul lamm em zao sonn e savis.

## Fañch an Uhel

### KLEMMGAN WAR MARO PROPSE PROUX<sup>64</sup>, BARZ KERNE.

#### I

Perag c'hoantaad mond kuit, o ! barz ?  
Sell, pep tra 'azo kaer hag a hoarz  
Bremañ euz an den, war ar bed,  
An heol, ar bleuniouz, an evned.

Chom ganim c'hoaz eur pennadig.  
Kan dim eur werz pe eur zonig,  
Rag te 'oar, gand eur ganaouenn,  
Lakaad prim pep kalon laouen.

An amzer, siwaz, a zo fall,  
Kourkoulz en Breiz 'vel en Bro-Hall,  
Evid c'hoarzin, kana soniou,  
Hag er prajou kuruill bleuniou ;

Allaz ! kaer em-bo c'hweza stard,  
Ner gano mui ma hoz bombard ;  
Pe mar kan, e vo truezuz,  
Evel kan eun anaon klemmuz.

A-dreñv, kañvou, teñvalijenn !  
Sell ! an heol, tad ar sklêrijenn,  
A skuill dre oll al levenez,  
Ar yhed hag ar garantez !  
Sell ! er parkou hag er prajou.  
El lanneg, evel er hoajou,  
Ar bleuniou koant, an alhweder,  
Pep tra 'gan an nevez-amzer !

Evned bihan, kanit bepred,  
Er hoajou, e-tal an dour-red,  
Bleuniou al lanneg hag ar prad,  
Bezit plijadur al lagad ;  
Mez ar barz koz ne gano ken,  
E galon 'zo leun a anken,  
Rag oll kement en-deus karet,  
Allaz ! 'zo bremañ diskaret !

A ! malloz ruz war ar brezel !  
A ! oll vugale Breiz-Izel,  
A zo o halonou, heb mar,  
'Vel hoh-hini, leun a hlahar.  
Mez, barz ker, kemer da vombard,

---

<sup>64</sup> Propser Proux : **Notenn gand embanner al leor** : Ar barz Prosper Proux a zo marvet en kêr Montroulez, an unneg pe an daouzeg a viz mae 1873, oajet a eur bloaz ha tri-ugent. Ar pezh-mañ a oa disklêriet da genta 'barz an Echo de Morlaix, an deiz kenta a viz Even euz ar menez bloaz.

Ha c'hwz enni, c'hwez enni stard ;  
Euz da gleved, ar Vretoned  
A 'n em ganno 'vel leoned.

Ya, pedom Doue d'on zikour,  
Ha malloz war an enebour !  
Kerzom kaloneg ha gand feiz,  
Red eo trehi, paotred vad Breiz !  
Red eo trehi... Kriom : you ! you !!  
Me 'vo ganeoh, ha ma gwerziou,  
Leun a garantez 'vid ar vro,  
Ho kraio treh, kent an distro.

« Malloz ruz d'ar Brusianed !  
Malloz d'al laeron gounaret !  
Torr e benn ! trehi, pe vervel !  
A-raog, bugale Breiz-Izel !  
A-raog ! eur gwir Breizad biskoaz  
Dirag eur hleze ne dehas ;  
Ar maro, kent an dizenor,  
A vezo bepred ger Arvor ! <sup>65</sup>»

II

Evel-se 'kane ar barz mad ;  
Uhel e benn, lemm e lagad,  
E kane, gand kalon ha nerz,  
E gan ker, e ziweza gwerz.

Mez 'dreg e gein 'oa an Ankou,  
Gand e falh, 'n e dorn deho  
Ha gand eun taolig, hep truez,  
'Trohas e gan hag e vuhez.

Ar genou a gane gwerziou,  
Gwerziou a vrezel ha soniou,  
Levenez an dud a beb oad,  
Setu-eñ bremañ leun a wad !

A ! pebez glahar, Bretoned !  
Setu marv roue ar varzed,  
Prosper Proux, ar haner lirzin,  
A lakae an oll da hoarzin !

Ar barz dispar en-deus savet  
Ar zoniou koant a vez klevet  
Kanañ a bep tu 'barz ar vro,  
Falhet eo bet gand an Anko' !...

---

<sup>65</sup> A vezo bepred ger Arvor ! : **Notenn gand an embanner** : Kement-mañ a zo kemeret euz gwerz diweza Proux, greet an eiz warn-ugent a viz Eost 1870.

A ! falher dall ha dinatur,  
Te a skuill glahar, heb muzur !  
Perag skei 'vel-se, en or hreiz  
Ar barz, levez oll dud Breiz ?

Allaz ! piou 'frealzo bremañ  
Ar paour-kêz gwasket er bed-mañ ?  
Rag netra ne dalv eur zonig  
'Vid kalon ar paour reuzeudig.

Kenavo, barz ker, ma mignon,  
A garen a-greiz ma halon !  
Amañ, pep tra a dro da fall ;  
Te 'zo gwelloc'h, en eru Vreiz all.

Er vro leh ma'z eo pep tra gwell,  
Leh n'eus na droug na brezel,  
Trubarderez na kasoni,  
Na poan, na kleñved, na kozni.

Azezet war o hadoriou,  
Ar varzed 'zelaou da zoniou,  
Ar varzed koz a gane c'houek,  
Hag a gomze ar brezoneg.

Brizeug, ar barz e vleo melen,  
Mestr ar gwerziou, mestr an delenn,  
'Vid da zegemer 'zo savet,  
Hag eñ 'deus evel-henn komzet :

« Prosper Proux ! Eur barz an dibab,  
N'oa ket en Breiz a welloc'h mab.  
'Veldon, en-deus karet e vro,  
Ha kanet, beteg ar maro. »

N'o-deus laret, ar varzed koz :  
« Ganit, kenvreur ker, on bennoz !  
Kan dim eun darn euz da zoniou,  
En yez Breiz, hag euz da werziou. »

Ma kanas Kimiad ha Distro  
Soudard Breiz-Izel en e vro ;  
*Ma vijen Barz ; mouez ar hleier,*  
Hag ivez son ar *Merhetaer*.

Ha re all c'hoaz : ha setu c'hoarz,  
O klevet soniou koant ar barz :  
Bep tro 'larent : « Koanta sonig !  
Kanit bepred ; c'hoaz unanig... »



O ! kaner c'houek, o ! barz karet,  
'Vid beza da gory douaret,  
Ne varvo biken da ano,  
Ha tud Breiz bepred a gano

Da zoniou koant ha da werziou,  
War an hentchou, en nozveziou,  
Ha *Bombard Kerne* 'vo meulet,  
Keit 'vo eur Breizad war ar bed !

'Vel eur gwir Varz ez out marvet :  
Gand ar bleuniou, kan an evned,  
Ez out eet kuit : dim oll kañvo' ;  
Mez beo ez out c'hoaz... Kenavo !...

F.-M. An Uhel  
Plouared, 14 a viz Mae 1873.

**Anatol Ar Braz**  
**JANEDIG AN DIZEZ**

‘Pad ema Fañch ha Mari deuz tao oh eva jist’,  
N’he c’hoaze war an oaled, Janedig a zo trist.

Janedig ‘zo trist oll, war an oaled azezet :  
Janedig a gar Fañchig, an hini<sup>66</sup> n’he har ket.

Rag siwaz ! ‘barz an ti na eo nemed eur vatez,  
Ha Fañch, pa n’eo ket sod, ‘zo well ganatñ ar vestrez.

Ar vestrez he-deus arhant, ha Janedig, siwaz !  
N’he-deus nemed bleo melen ‘uz d’he daoulagad glaz.

Mari ‘deus ed ‘n he farkou : c’hwi, Janedig, he matez,  
Lezet Mari da hoarzin, ha peillit ho patatez.

Fañch ne zell ket diouzoh, merhig, ha koulskoude  
Ho lagad a zo skeduz, ‘vel an heol ‘n kreiz an de’.

Fañch ha Mari, da Bask, a vo dimezet o-daou :  
C’hwi, Janedig, a gaso o boued d’ar moh ‘n o hraou.

Peillit ‘ta ho patatez, na zavit ket ho penn,  
Plahig he daoulagad glaz dindan he bleo melen.

Pleget ho tal, Janedig, kuzet ho koantiri :  
Mari ‘n-deus leun a vadou, da Fañch e plij Mari.

Ha koulskoude, paourezig, ma vijen-me da choaz,  
Me ‘choazfe da vleo melen ha da zaoulagad glaz.

Na, mar serrez da galon, lez an alhwez en nor :  
Gwelloh ‘vid Fañch marteze ‘teuio da houl digor.

Ha pa erruo hennez, martlod pe zoudard,  
Lak en-dro d’e houg nerzuz da ziouvreh, ‘n eur pok stard.

Sav da di ‘barz al lanneg pe war bordig an aod ;  
Gra dim bugale zeder, yah o gwad, ruz o jod !

Gra dim tud a wir galon, evel on zadou koz,  
Bretoned en peb amzer, hag en deiz hag en noz !

Ro deze lêz Breiz da dena, ha pa vont erru braz,  
Pa vo gwenn da vleo melen ‘uz da zaoulagad glaz,

Kan deze penaoz e’ gwelloh karantez leiz an dorn,

---

<sup>66</sup> an hini ; pehini, er skrid orin.

‘Vid arhant leiz ar presou, pe bara leiz ar forn !

.....

Ar zon-mañ gand eur hloareg ‘zo savet en Kemper,  
Da Janedig an Dizez, matez en Feunteun-Ber.

Pa oah ken trist, Janedig, hemañ ne oa ket pell,  
Med pez ‘zo deuz an oaled da vond d’ar bank-tosel  
Anatole Ar Braz.

**Prosper Proux**  
**MA VIJEN BARZ.**

**Prosper Proux**

**MAR VIJEN BARZ**

A ! perag n'am-eus ket  
Ho Telenn alaouret !  
Marzin, Gwenc'hlan, Riwal,  
Barzed, an amzer all ?  
'Veldoh, a vouez uhel,  
Da hekleo Breiz-Izel,  
Me a daolje eur garm  
Kizellet war an arm<sup>67</sup>

Gand ar vouez ar skiltra,  
E yez Breiz ar gaerra,  
Hab ehan, me 'veulje  
Oberiou kaer Doue,  
An Doue Braz krouër,  
E halloud, e vrazder,  
E hloar, e vadelez,  
Ha bep peurbadelez.

A-droh askell gand êr,  
Me 'garje, 'vel an erer,  
Nijal dreist ar goabrenn,  
Selled, heb divalvenn,  
Ouz an heol benniget ;  
Gweled an dud bodet  
Evel eur stroll verien,  
O vervi, er boultrenn.

Perag on ken dister !  
Evel an alhweder,  
Pa fell dezañ sevel  
Er houmoul re uhel  
E rank, timad, diskenn  
Da guzañ, en ervenn,  
E askellig feaz<sup>68</sup>,  
Me 'zo 'veltañ, siwaz !

N'on ket Barz ! nann, biken  
'N vo brudet va zelenn,  
O ! nann ! ha koulskoude,  
E trid va oll ene  
O weled ar houmm eonuz,

---

<sup>67</sup> arm : arem.

<sup>68</sup> feaz : fêz (leoneg, evid ar rim).

O tidarzo, diboell,  
Dreist ar herreg uhel.

Karoud a ran gweled,  
Dre an oabl al luhed  
Gand o gourgammou tan.  
Kleved trouz an Taran,  
Pa strak er goumoulenn ;  
Ar ster gand he froudenn,  
Ar stourm, 'n eur hwibanad,  
Pa zraill dervenn ar hoad.

Karoud a ran, dreist-oll,  
Arvesti ouz an heol  
Pa strink, euz ar beure,  
Dreist kribell ar mene'  
D'abardaez pa guz  
'Barz ar mor islonkuz  
O tana an neñvou  
Ha kern an houlenou.

E-pad eun nozvez hañv,  
Gand eurdad, e karan  
Gweled dremm gaer al loar,  
Ar rouanez impar ;  
Ar stered diniver,  
Hadet gand ar hrouër  
E-giz da vleuniou tan  
Dre volzou an oabl splann.

Euruz on, pa welan,  
An Êlig-Doue skañv  
Gand e gammigellou  
Pa nij 'touez ar bleuniou,  
Pa glevan, er vojenn,  
Al laboused laouen  
O richana dibled,  
O zon d'o farezed.

Me 'gar a-nerz kalon,  
Kement a zo gwirion,  
Yaouankiz ha glanded,  
Galloud, ijin, spered ;  
Gand truez e leñvan,  
En-dro din, pa welan,  
Paourentez, dienez,  
Gouliou, hag enkreuz.

Kaseet am-eus bepred,  
Pilpouzed, trubarded,

An teodou binimuz,  
Ar vezventi fankuz,  
Mignoned diwirion,  
*Tostennet* digalon  
Stouet rag al *Leue aour* ;  
Didruez ouz ar paour.

A ! perag n'am-eus ket  
Ho Telenn alaouret ?  
Heb ehan, me 'veulje  
Oberiou kaer Doue.  
Me 'zrailje, heo paouez,  
Indan zaol va boutez,  
An oll amprevaned  
A skuill binim er bed.

**Le Jean ( ? )**

**KIMIAD AR BARZ BREIZAD**

.Karet am-eus ma Breiz-Izel,  
He lann, he brug hag he rehell ;  
Karet am-eus he meneziou,  
He gwaziou kamm, he zraoniennou.

Karet am-eus he hentchou treuz,  
He roziou bleun, he zouriou kleuz,  
Karet am-eus enni beva,  
Pa oan eüruz gê o kana.

Kraet am-eus krozmol ar mor,  
D'an abardaez war doull ma dor ;  
Karet am-eus mouez ar raned  
En noz o kana oll kevred.

Karet am-eus trouz an avel  
O youhal skiltr er gwez uhel ;  
Karet am-eus mouez ar gaouenn  
O huanada er goz dervenn.

Karet am-eus bleuniou al lann,  
Kurunenn Vreiz a-viskoaz glan ;  
Karet am-eus mond d'ar hoajou  
Da rei d'an hekleo ma zoniou.

Karet am-eus trêz aour an aod,  
He gregin gwenn, kant tra dibaod ;  
Karet am-eus ma bragou braz,  
Ma bleo hir, ivez ma fenn-baz.

Karet am-eus ma zoenn-blouz  
Ha kousked didanni didrouz ;  
Karet am-eus kana en noz,  
En hentchou don, *An hini goz !*

Karet am-eus ivez Mari  
'Vid he goulenn da zimezi ;  
Karet am-eusn er pardonieu,  
Tridal ouz son ar biniou.

Karet am-eus pedi Doue  
E-kreiz ar vered war eur be' ;  
War bez ma far, war bez Mari,  
Maro, kañvusa disparti !

Karet am-eus mond d'ar Releg  
Da ober ma gouestlou deizeg ;

Karet am-eus santez Anna,  
En he zi skuiz-mad o ouela.

Karet am-eus mond da Vulad  
Gand ma baz wenn, ma botou-koad ;  
Karet am-eus, dreist pep tra oll,  
Skuilla daerou e Rumengol.

Karet am-eus, e Gwir-Zikour,  
Enebi ouz an enebour ;  
Karet am-eus, e Sant-Kare,  
Pedi an Itron a Drue'.

Hag abaoe ma'z eo kouezet  
Ouz ma dorn telenn ar Varzed,  
Ne garan netra ken e Breiz,  
Nemed he sent koz hag he feiz.

Kenavo bremañ d'an douar,  
Ennañ n'ez eus nemed glahar ;  
Kenavo d'am bro Breiz-Izel,  
Allaz ! allaz ! red eo mervel !...

Kenavo da Varzed ma bro,  
War ma lerh i c'hoaz a gano ;  
Kanit, dalhmad, kanit uhel,  
Mil meuleudi da Vreiz-Izel.

Ma hellfen, a oueled ma bez,  
Sevel dezi eur werz nevez ;  
Ni he hanfe,ma far ha me,  
Unanet laouen adarre !